

Kêrioù Arz

Glad Kêrioù Breizh





Pennad-stur

Breizh zo ur vro tost d'an douar, anavezet mat he glad d'ibar a-ziwar ar maez ; ur glad liesseurt, ledet ha merket splann gant ar relijion, an noblañs hag an arz-brezel : chapelioù, kalvarioù ha klozioù-parrez, peulvanoù ha meurvein, tiez-plouz, manerioù, kestell ha kreñvlec'hioù...

Ur vro martoloded zo anezhi ivez, enni un drederenn eus arvor Frañs. Eus an dibab eo glad mor Breizh ha plijout a ra forzh pegement d'ar weladennerien, evel m'en diskouez brud ar gouelioù a vez aozet evit e enoriñ.

Padal, piv a oar pegen kreñv eo hengoun kêrioù Breizh, lod anezho kozh evel an Impalaeriezh roman, lod all evel ar Grennamzer, pe mare an dalc'helezh pe c'hoazh mare an Dizoloadennoù Meur ?

Ar c'hêrioù savet en-dro da savadurioù keodedel, manatioù pe moudennoù feodel, peurliesañ e-lec'h ma oa bet savet ur pont kentañ hag e lec'hioù difenn, zo ken niverus hag ar c'hornioù-bro disheñvel a vuhezkaont.

Lod o deus treuzet ar c'hantvedoù hep poan ha bremañ ez int deuet da vezañ kêrioù brasañ Breizh. Lod all n'o deus ket gallet derc'hel d'o lufr, kollet ganto o c'harg velestradurel pe armerzhel a-feur ma cheñche ar politikerezhioù pe da vare an Dispac'h Greantel. Un toullad kêrioù o doa graet berzh gant kenwerzh ar "mezher" pe al "lien", pe kêrioù-eskopti eus ar Renad Kozh zo deuet evel-se da vezañ bourc'hioù bihan, kêrioù "relegoù".

Met an holl anezho a zalc'h da vezañ kêrioù gwirion, gant ur glad kêr gwarezet ha kempennet mat : Kêrioù Bihan Neuziet-kaer evit ar c'humunioù bihan aozet e-barzh ur gevredigezh rannvroel, Kêrioù Arz hag Istor ha Kêrioù Istor, evit ar c'humunioù brasoc'h, kevelet e-barzh un unvaniezh vreizhat. Div rouedad zo en em vodet evit brudañ kreiz kêrioù kozh Breizh, ha kinnig anezho dindan an anv genrek-mañ : Kêrioù Arz.

An tu-se eus Breizh a ginnigomp deoc'h ober anaoudegezh gantañ er c'hraflevr kaer-mañ.

Jean-Bernard VIGHETTI

8 31

Kêrioù Bihan Neuziet-kaer Breizh

- 8/9 Digoradur
- 10 Bazeleg-ar-Veineg
- 11 Begerel
- 12 Kastell-Geron
- 13 Kastellaodren
- 14 Komborn
- 15 ar Gemene
- 16 Gwerliskin
- 17 Josilin
- 18 Lanyugon
- 19 ar Roc'h-Bernez
- 20 ar Roc'h-Derrien
- 21 ar Faou
- 22 Lehon
- 23 Lokorn
- 24 Malastred
- 25 Monkontour
- 26 Pontekroaz
- 27 Pontrev
- 28 Kintin
- 29 Roc'h-an-Argoed
- 30 Rosko
- 31 Landreger



Taolenn

32 54

Kêrioù Arz hag Istor ha Kêrioù Istorel Breizh

- 32/33 Digoradur
- 34 an Alre
- 35 Kastell-Briant
- 36 Konk-Kerne
- 37 Dinan
- 38 Felger
- 39 Gwengamp
- 40 Henbont
- 41 Lambal
- 42 Landerne
- 43 Lannuon
- 44 Montroulez
- 45 Naoned
- 46 Pondi
- 47 Porzh-Loeiz
- 48 Kemper
- 49 Kemperle
- 50 Roazhon
- 51 Sant-Maloù
- 52 Kastell-Paol
- 53 Gwened
- 54 Gwitreg

55

Kartenn Breizh



Kêrioù Arz

Glad Kêriù Breizh



Lec'hioù awenet

Emañ ar C'hêriù Arz e-touez lec'hioù priziusañ ledenez Arvorig, e-touez lec'hioù kaerañ "Penn-ar-Bed" en Europa, lec'hioù ma ranker mont evit kompren mat identelezh Breizh.

Dibar eo al lec'hioù m'int bet diazezet peurliesañ : tarzioù ha kentrelloù, ma vez "reier kreñv" ; kemerioù ha goueledoù aberioù, lec'hioù eskemm naturel etre kornioù-bro disheñvel, etre bed an douar ha bed ar mor ; begoù-douar ha leurennoù, havrioù prederiata hag arvestiñ a-uc'h ar paludoù holen hag an taouarc'hegoù, plaennoù ha traoñiennoù strujus. Ur galv diharz d'ar vrezelourien, d'ar varc'hadourien pe d'ar gloer diazezerien en henamzer-se.

Ar C'hêriù Arz zo ivez, dreist-holl, lec'hioù a zo bet savet, stummet a-dreuz ar remziadoù gant kumuniezhioù tud, hervez o obererezhioù, o barregezh krouiñ, o blizidigezh ; holladoù kempouez zo anezho o lakaat da gengloañ stiloù ha doareoù savouriezh ; kreizennoù plijus ma'z eo diwanet istor hag identelezh Breizh. Lec'hioù koun ma santer c'hoazh louc'h an ijin, c'hwezh ar spered ; dorioù digor war ribloù an amzer...



Ur glad dibar

E Breizh eo disheñvel an holl gêrioù kozh. Ma vez gwelet kalz, amañ evel e lec'h all, levezon ar modoù savouriezh war berzhioù disheñvel ar savadur, gwall alies ez int bet stummet, lakaet da vont diouzh gizioù ar vro, evit reiñ ur stil dibar kreñvaet c'hoazh gant danvezioù kemmesk-tre a veze kavet war al lec'h.

A c'hiz c'hotek flammek eo ar pep brasañ eus savadurioù relijiel ar ^{XVI}^{vet} kantved e Breizh, n'eus ket kalz a c'hiz an Azginivelezh.


E kêrioù eus diazad Roazhon ma ne oa ket mein, e oa bet kendalc'het d'ober savadurioù gant bannoù koad betek an ^{XVIII}^{vet} kantved, tra ma ne oa ket aet kalz pelloc'h eget ar ^{XVI}^{vet} kantved e lec'h all e Breizh.

Muioc'h c'hoazh eget disoc'h al levezonoù diavaez pe ar varregezh d'ober diouzh rediennoù al lec'h e tiskouez ar glad pegen kozh eo Kêriù Arz Breizh, pegoulz e oant pinvidik pe paour, piv e oa o annezidi, tud voutin pe galloudus, penaos e oa kont dec'h ha bremañ : ur pezh kentel Istor dindan an amzer hag a zigor un hent touristel dibar e pep Kêr.

Kreiz ar c'hêrioù kozh pinvidik ha gwarezet mat

Er pep brasañ eus Kêriù Arz Breizh ez eus bet chomet ur stalad monumantoù bras, evel ilizoù-meur, ilizoù romanek pe gotek, dorioù, ramparzhioù ha kestell, befrezoù ha koc'huioù, kouentoù ha savadurioù keodedel, met ivez kalz elfennoù all eus ar savouriezh, ur c'henaoad soutil a annezioù, feunteunioù ha kizelladennoù, parkoù ha liorzhoù, plasenoù, straedoù ha porzhioù diabarzh.

Dibar eo ar glad stank-tre-se pa'z eo bet gwellaet kalz e-korf an tregont bloavezh zo tremenet, gant politikerezhioù oberiant evit neveziñ al lojeiz, adkempenn an talbennoù, douarañ ar rouedadoù tredan, labourat war an asagnoù pe ar rakstaliù. Evel-se ez int deuet da vezañ takadoù kreiz-kêr dedennus-bras ha muioc'h c'hoazh pa'z eus bet savet takadoù evit an dud war droad, troet kreiz ar c'hêrioù kozh e gwir parkoù mein, roet lañs da genwerzh ar vro, broudet an dud da aozañ abadennoù.



Kreizennoù buhez

Ur Gêr Arz zo anezhi ur meskaj soutil ha kemplezh a straedoù, plasenoù ha mailhoù, monumantoù ha tiez, lec'hioù foran ha madoù prevez, ul lec'h emgav dre natur zo bet darempredet ha stummet gant pep a rummad tud. Ul lec'h buhezek eo a-hed ar bloaz, ul lec'h a blij d'an dud, ne vern e vent.

Peurliesañ ez eus chomet un obererezh kenwerzhel ha sevenadurel a bouez e kreiz ar c'hêrioù kozh hag e karterioù skouer ar C'hêriù Arz hag Istor hag ar C'hêriù Istorel. Alies o devez miret ar C'hêriù Bihan Neuziet-kaer ul levezon war an trowardroioù ha gant se ez eus anezho, hiziv an deiz c'hoazh, gwir greizennoù kenwerzhel ha melestradurel, "kêrioù" a vat, ha neket bourc'hioù war ar maez.

Kaeroc'h zo, gant endro kaer ar C'hêriù-se, o gizioù gourc'hemenn pe mekenaz a wezhall hag o zalvoudegezh touristel a vremañ, ez eus bet mistri-artizaned o tont d'en em staliñ eno, staliù-arz ha palieroù arz, annezioù arzourien o tont war wel. Diwar neuze eo bet kreñvaet o galloud dedennañ, o levezon sevenadurel.

Gweladenniñ Kêriù Arz Breizh zo kement ha soubañ en o amzer-dremenet, da bep koulz, bevañ un tamm eus buhez o annezidi, liammañ boued douar gant boued spered, bamañ dirak ar staliù dindan hud ar vein gozh.

Kêrioù Arz Glad Kêrioù Breizh



Kêrioù daou vil bloaz

N'eus ket kalz kêrioù e Breizh o deus miret ar statud-se abaoe ar marevezh gal-ha-roman hag a zo kresket abaoe. Diwar ar pemp pennlec'h a oa en Arvorig da neuze, n'eus nemet tri er blegenn-se : Naoned, Roazhon ha Gwened, dre ma oant deuet da vezañ sezioù eskobel, evel bremañ c'hoazh. Er Grennamzer Uhelañ ha betek kreiz an IX^{vet} kantved o doa stourmet an dud nevez degouezhet er vro evit kaout beli war an teir c'hêr-se : ar Vretoned, er c'hornôg, krouet ganto "Breizh vihan", ar Franked er Reter, savet ganto ar Marzoù en-dro da Naoned ha da Roazhon. Evit derc'hel beli war Gwened ha Bro-Gwened e oa bet brezel etre ar pobloù-se betek 845-851, pa voe staget Marzoù ar Franked ouzh tachenn ar Vretoned a grouas "Rouantelezh Breizh" a-raok na drofe en un dugelezh. Met gant an div gêr-se eus ar Marzoù e oa ar galloud e dugelezh Breizh. En div gêr-se ivez e oa diazezet galloud ar roue evit lakaat e grabanoù war ur broviñs kreñv hec'h identelezh ha disuj a-walc'h. An div gêr bouezusañ ez int e Breizh c'hoazh. Liesseurt ha pinvidik eo glad kêrioù Breizh eta. An holl brantadoù eus ar glad a c'heller gwelet, en un doare splann alies e Naoned hag e Roazhon, dre ma'z eus kêrioù-penn anezho, nebeutoc'h e Gwened ma vezont strewetoc'h ha kempouezetoc'h.




Kreizennoù relijiel a orin breton

An tolpadou-se, a oa bet krouet ar pep brasañ anezho er Grennamzer Uhelañ, a c'hoarvez eus eil rummad kêrioù Breizh na gaver ket e lec'h all ebet. Da-heul aloubadegoù ar Vikinged en IX^{vet} hag en X^{vet} kantved ne oa ket chomet gwall dra eus ar manatioù kentañ bet diazezet gant divroerien vreton o tont eus an tu all da Vor Breizh, nag eus an tiez savet en-dro dezho. Met alies e oa bet ac'hubet al lec'hioù en-dro, dreist-holl e-lec'h ma oa abatioù bras, sezioù an eskoptioù. Ensavadurioù keltiek zo eus an abatioù eskobel-se a gaver en Iwerzhon hag e Breizh-Veur ivez : ar manati a oa kavell ha kreizenn an eskopti, ne oa ket liammet e levezon ouzh ur vro bennak, met kentoc'h ouzh pouez e abad. Betek dibenn ar Renad Kozh e oa c'hwec'h kêr eskobel a orin breton e Breizh, Dol, Sant-Maloù, Sant-Brieg, Kastell-Paol, Landreger ha Kemper, e-kichen ar re a orin gal-ha-roman, Naoned, Roazhon ha Gwened.

Abati Redon, a oa bet krouet e 832 gant menec'h vreton, en dije gallet dont da vezañ sez un eskopti ivez, ma ne vije ket aet gant urzh sant Benead ha ma ne vije ket bet e-barzh eskopti Gwened dija. Koulskoude e oa un abati veneadat galloudus hag a astennas he levezon un tamm e pep lec'h e torosad Arvorig. Evel-se e voe krouet kêrioù abati all, evel Kemperle, Lehon pe Gweltaz-Lambrizig, ha kêrioù feodel, evel ar Roc'h-Bernez ha Kastell-Briant. Istor Lokorn, savet en-dro d'ur peniti, zo stag ouzh hini Kemperle. Kont Kerne, goude bezañ sikouret da grouiñ abati veneadat ar Groaz Santel e Kemperle, a roas ur prioldi ha bourc'h Lokorn d'ar gumuniezh menec'h nevez. E fin ar gont, ha pa vije nebeut-tre a greizennoù relijiel a orin breton, o deus kalz a vrud gant o glad sakr kozh ha dibar.

Kêrioù feodel

E-kerzh azginivelezh ar c'hêrioù en XIV^{vet} hag en XII^{vet} kantved e Breizh o doa bet ar c'hestell ul levezon vras. Buan e oa bet sachet ar genwerzhourien hag an artizaned war-zu ar c'hreñvlec'hioù savet a-hed Marzoù Breizh, abalamour d'o fouez strategel, dre ma oant war dakadoù daremprediñ hag eskemm, hag o vezañ ma oa bet staliet prioldioù enno, abatioù beneadat ar pep brasañ anezho. Dre Vreizh a-bezh e oa strewet ar "bourc'hioù-kestell"-se, staliet e-skeud ur c'hastell-kreñv o kontrollañ un hent tremen. Tostik-tost d'ur c'hroashent, d'ur roudouz pe d'ur pont e oa staliet ar moudennoù feodel hag o zolpadoù er penn-kentañ, ha goude-se e c'hounezjont tachenn war lec'hioù naturel damdost, gwarezet muioc'h ha troet evel-se e "reier kreñv". E-lec'h ma ne oa ket difennoù naturel gant an torosennadur, e oa bet savet difennoù espar dre an dour gant savourien vilourel an XII^{vet} hag an XIII^{vet} kantved, dreist-holl e Kastellaodren, Lanyugon pe Malastred.



Kêrioù an arvor

Mard eo bet lieskementet niver ar c'hêrioù war an aod e Breizh, en XIX^{vet} hag en XX^{vet} kantved abalamour da gresk ar peskerezh hag an touristerezh kouronkañ, n'eus ket kalz kêrioù aod a gozh avat. War-zu an douar e oa troet Breizh, kentoc'h eget war-zu ar mor, hag e-pad pell e voe diazezet ar c'hêrioù e goueled ar plegoù-mor, an aberioù, tro-dro d'ar pontoù kentañ, ha n'eo ket a-dal d'ar mor bras, war var gant aloubadegoù pobladoù merdeerien an norzh : Saozon, Vikinged... Ar pep brasañ eus ar c'hêrioù aod kentañ a ziwanas hag a greskas e fin ar Grennamzer e toullou-digor ar plegoù-mor pe an aberioù neuze, ha war-lerc'h dizoladennoù meur ar XVI^{vet} hag ar XVII^{vet} kantved, gant lañs bras ar c'henwerzh etrebroadel hag al lien a roas ur pouez strategel dezho. Dont a rejont da vezañ kreñvlec'hioù ha lec'hioù meur evit ar vorbreizherien hag ar rederien e Breizh.

Marevezh meur al lien

Etre dibenn ar XIV^{vet} ha kreiz an XIX^{vet} kantved e oa al lien unan eus an obererezhioù armerzhel pouezusañ e Breizh. Gant an dizoladennoù meur hag an eskemmoù mor etrebroadel o kreskiñ e oa diwanet hag e oa bet kaset war-raok. E barr e vleuñv e oa e dibenn ar XVII^{vet} kantved en abeg d'ar c'henwerzh hep e bar a oa bet digoret gant Ledenez Iberia ha kevandir Suamerika. Ehanet e oa bet en XVII^{vet} kantved en abeg d'ar brezel a-enep Bro-Saoz a gontrolle ar morioù hag a veze gwerzhet kalzik al lien dezhi betek-henn, evel da Flandrez. Diskaret e voe da vat en eil hanterenn an XIX^{vet} kantved pa'z eas marc'had Spagn d'an traoñ hag abalamour d'ar greanterezh mekanikel n'o doa ket gouezet ar vourc'hizien kas war-raok e Breizh. Eus amzer-dremenet ar gwiaderezh e Breizh e chom roudoù er c'hêrioù a vremañ : anvioù ar straedoù dreist-holl ha tiez kaer-tre savet gant marc'hadourien binvidik. Kalz arc'hant a oa bet postet evit sevel traoù bras-eston, klozioù-parrez en o zouez, e lec'hioù zo bihan-tout bremañ, war ar maez.



Kevredigezh Kêrioù Bihan Neuziet-kaer Breizh



E 1975, bloavezh ar savouriezh en Europa, e oa bet roet lañs d'ar C'hêrioù Bihan Neuziet-kaer e Breizh.

Ar pal a oa talvoudekaat ar c'humunioù dibar, kumunioù war ar maez, poblet distank, ha war un dro kêrioù anezho abalamour d'o istor ha d'o glad ; kozh kêrioù kozh o doa kollet o renk da-heul ar Gemmdro velestradurel ha greantel e Frañs.

Abaoe 1976 o deus kensinet ur garta kalite hag a vez gwellaet ingal gant ar gevredigezh a vod 22 gumun renket, hervez o barregezhioù gwareziñ, adkempenn, talvoudekaat ha buhezekaat, e rumm ar c'hêrioù degemeret da vat pe e rumm ar c'hêrioù da vezañ degemeret. Gant an holl emañ an dezverk pennañ evit bezañ er gevredigezh : kaout un orin hag ur glad kêrel eus an dibab.

Setu amañ ar c'hêrioù degemeret da vat : Begerel, Kastell-Geron, Kastellaodren, Komborn, Josilin, Lanyugon, ar Roc'h-Bernez, Lehon, Lokorn, Monkontour, Pontekroaz, Pontrev, Kintin, Roc'h-an-Argoad, Rosko ha Landreger.

Setu amañ ar c'hêrioù da vezañ degemeret : Bazeleg-ar-Veineg, ar Gemene, Gwerliskin, ar Roc'h-Derrien, ar Faou ha Malastred.

Gant skoazell vras Kuzul-rannvro Breizh hag Europa eo deuet a-benn Kêrioù Bihan Breizh da saveteiñ ha da wellaat o glad tamm-ha-tamm, ha da reiñ c'hoant d'ober kemend-all e Broioù al Liger, er Poatev-Charantez, er Frank-Kontelezh hag en Alpoù Provañs Uhelañ.

Evit reiñ muioc'h a vrud dezho e striv ar gevredigezh bremañ da lakaat war wel ar pezh a ra da bep kêr bezañ dibar, diwar skouer Begerel a zo deuet da vezañ Kêr al Levrioù pe Pontrev, anavezet mat he c'hanndioù bokedet war-ripl an Trev ; labourat a ra da vrudañ stummoù degemer disheñvel ; dre gemer perzh er rouedad, « an Arz er C'hêrioù » a sikour, abaoe un dek vloaz bennak, da reiñ bod da livourien estren, evit liesaat ar selloù kroaziet war glad ar C'hêrioù : Rusianed, Sinaiz, Tcheked hag Amerikaned.

**Kevredigezh Kêrioù Bihan
Neuziet-kaer Breizh**
1 straed Raoul Ponchon - CS 46938
35069 Roazhon Cedex
Pgz : +33 (0)2 99 84 00 80
citesdart@tourismebretagne.com
www.cites-art.com

Bazeleg-ar-Veineg



Lec'h war an uhel.
Kêr a orin relijiel gal-ha-roman
ha kêr-gastell.



A-viskoazh eo bet Bazeleg-ar-Veineg ur gêr vevenn, ul lec'h eskemmoù ; savet e oa bet war an harzoù etre div geoded, hini ar Goriosolited ha hini ar Riedoned, hag adkavout a reer enni perzhioù an daou gristenadur : gal-ha-roman ha breton goude-se. Mont a reas war ziskar un tamm e-kerzh ar Grennamzer-Uhel moarvat, ha tapout a reas lañs en-dro er maread feodel pa zeuas da vezañ ur gêr-gastell a weler roudoù anezhi en deiz a hiziv c'hoazh.

E penn kentañ ar XVI^{vet} kantved e oa ouzhpenn 5 000 a dud o chom e Bazeleg, a oa troet d'al labour-douar ha d'ar c'henwerzh. Chomet ez eus ur bern roudoù eus ar mareoù berzh-se e kêr. E-barzh mell Maner ar C'houldri, war blasenn an Ti-kêr, e oa aotrouien gozh Bazeleg o chom moarvat. Un tamm pelloc'h ac'hano, war-zu plasenn ar Monumant, e weler maskloù iskis hag a zo oc'h ober ardoù war Ti ar re Grouget. War ar blasenn-se bepred, a oa bet savet e 1604, e vez sachet selloù an den war-zu ur prenestr korn kinklet kaer : emañ ouzh un ti hag a oa gwechall da brokolor ar roue. E penn uhelañ ar gêr e vezer souezhet gant perzhioù dibar iliz Sant Pêr ha Sant Paol : div iliz sko an eil en eben hag a ya d'ober c'hwec'h nev, gouestlet da sent disheñvel hag a zo stag pep hini ouzh ur c'houlzad kristenaat. Adingalet penn-da-benn e oa bet ar savadurioù en XIX^{vet} kantved d'ober an iliz a weler bremañ. Gallout a reer ober gwelloc'h anaoudegezh gant ar glad pinvidik-se dre un hentad displegañ. Gantañ ez eer da zizoleiñ kêr dre an tu a vez kuzhet dre gustum, da gejañ gant traoù dic'hortoz, gant ar varzhoniezh, gant gwirioù ar gêr a vremañ.

Meur a zoare zo d'ober anaoudegezh gant ar glad : mont da zastum e wrizioù e liorzhoù an Istor, kejañ ouzh an dud a laka anezhañ da vevañ adarre, mont da-heul e faltazi ha neuze bezañ souezhet. E Bazeleg, kêr ar varzhed hag an neuzierien krouerien, e vez adkavet an holl zoareoù-se war un dro en un droiad hag a ya eus ar boutikloù aet da balieroù, betek stalioù-labour arzourien gennet etre tiez greunvaen uhel. Delc'her a ra kêr orin Angèle Vannier, a-us d'ar maezioù garzhaoek tro-war-dro, da awenañ an arzourien bepred.

Ti an Douristed Kergarter
2 plasenn an Ti-kêr
35560 Bazeleg-ar-Veineg
Pg : +33 (0)2 99 97 40 94
ot.info@tourisme-paysdantrain.com
www.tourisme-paysdantrain.com

Begerel



Lec'h war an uhel, war ar vevenn etre diazad ar Renk ha hini ar Gwilen.
Kêr-gastell doare « roc'h kreñv ».



Emañ ar gêr-se a-us traoñienn uhel ar Renk. Bet e oa gwechall ur c'hreñvlec'h gouestlet d'an arme ha kavout a reer enni roudoù eus ar mareoù o deus bet ul levezon vras war hec'h istor leun a durmud. Gant kement-se e weler ivez penaos he deus gallet en em ober diouzh an holl vareadoù, ur souezh. Berzh a reas Begerel eus ar XVI^{vet} kantved betek an XVIII^{vet} gant al lin hag ar c'hanab. Hiziv an deiz eo deuet ar greizenn gêrel-se, gant he glad savouriezh miret e stad vat, da vezañ ar c'hentañ Kêr al Levrioù® e Frañs.

Anvioù straedoù ar Ganaberi hag an Nezadeg a zegas da soñj deomp eus ar mareoù gwechall, pa yae labour al lin d'ober obererezh pennañ kêr, ha gant tiez an noblañsed hag ar varc'hadourien, graet e greuvaen benerezh brav, e weler pegement a bouez a oa ganti evit a selle ouzh ar c'henwerzh. Produet e veze neud lin eno, ar re wellañ e Breizh, hag a oa brudet er Rouantelezh a-bezh, hag ivez en tu all da Vor Breizh ha d'ar Mor Atlantel. Mont a rae plasenn ar c'hoc'huioù kozh, a gaver en-dro dezhi tiez-anez cheuc'h evel Osteliri Skoed ar re Laval (XV^{vet} kantved) hag an ti a reer « Ti ar Gouarnour » anezhañ, d'ober kalon ar c'henwerzh-se da neuze. Pa sell ar vizitourien ouzh relegoù ar ramparzhioù hag ouzh tour ar c'hastell kozh e c'hallont kompren neuze e oa pouezus ar c'hreñvlec'h-se a-fet strategiezh e-pad Brezel Hêrezh Breizh. Adingalet eo bet ar glad evel zo dleet hag en em staliet ez eus levrduerien, arzourien hag artizaned-arz eno, gant-se e vez buhez ha birvilh adarre a-hed ar bloaz e kreiz-kêr kozh Begerel hag en he ziez merket gant an istor, ha deuet eo da vezañ trede Kêr al Levrioù® en Europa.


Souezhusat tra gwelet ur « gêr vezevelliñ » mod Breizh, pell diouzh an hentoù darempredet stank, o kejañ gant bed digustum al levrduerien hag al levrioù kozh ! Ur glaoustre dic'hortoz eo lakaat en e soñj, p'emaomp o vevañ e bed ar skeudennoù, difenn ar gwellañ ma c'haller al levrioù hag ar blijadur o lenn, ar skrivañ hag ar skrivagnerien, ar c'haerskriverezh, ar c'heinerezh hag ar skeudennaouiñ, ha degas buhez en-dro, met en un doare disheñvel, en un hêrezh deuet digant an arme, an noblañs hag ar c'henwerzh. Da-heul al lusk-se ez eus deuet ivez betek kozhigellourien, palieroù ha neuzierien d'en em stalial da Vegerel, ha gant gwir abeg neuze ez eus bet digoret eno un Ti al Levrioù hag an Touristerezh.

Ti al Levrioù hag an Touristerezh
4 hent Moñforzh
35190 Begerel
Pg : +33 (0)2 99 66 65 65
contact@becherel.com
www.becherel.com

Kastell-Geron



Kêr-gastell e Marzoù Breizh.



Daoust m'emañ tost-ha-tost ouzh meurgêr Roazhon e fell d'ar gêr-gastell chom ur gêr en hec'h-unan da vat. Harpet war hec'h istor mil bloaz e laka kalz a nerzh evit bezañ anavezet dre he folitkerez kempoell a-fet sevenadur hag abadennoù, hag evit delc'her ha liesaat hec'h obererezhioù a gêr-benn, a zo strewet mat er c'hreiz-kêr istorel : an ti-kêr, ar sal diskouezadegoù ha sal ar gouelioù er c'hastell kaer diazez, ar vediaoueg er c'hoc'huiou kozh, staliou en tiez, ostalerioù o bannoù koad hag o asagnou treset brav...[≡]

Savet e voe ar c'hastell er Grennamzer diwezhañ evit difenn kêr-benn Breizh nepell alese. Ur gwir greñvlec'h eo e-kreiz Kastell-Geron, a zo bet savet d'ar memes mare. Er gêr-se, souc'het a-dreñv tourioù uhel he c'hastell, e kaver kalz tiez o bannoù koad livet. Hiziv an deiz e vez degaset birvilh en-dro d'ar glad-se gant ur vuhez sevenadurel puilh.

En ^{XIV}vet kantved e voe savet ar c'hastell gant ur marc'heg deuet eus Normandi moarvat, Anquetil e anv, hag a oa bet roet douaroù dezhañ gant dug Breizh, gant ar gwir da sevel e gastell eno. Diwar anv e vab, Geron, e teu anv al lec'h. E-kerzh ar Grennamzer en em gavas al lec'h strategel-se e penn ur varoniezh vras. Kregiñ a reas ar gêr da greskiñ en-dro d'ar c'hastell adalek an ^{XII}vet kantved. Diazezet e voe ur prioldi eno gant menec'h abati Sant-Melan eus Roazhon. Ouzhpenn ur greizenn velestradurel e teuas Kastell-Geron da vezañ ivez, e-doug ar Grennamzer, ur pol kenwerzh brudet evit e varc'had bep sizhun, e foarioù teir gwech ar bloaz ha kenwerzh al lien-gouel a veze graet Noal anezho. En ^{XVIII}vet kantved e voe treuzfurmet ar c'hastell da vont da di-annez gant ar perc'henn nevez a lakaas astenn hag adstummañ ul lodenn anezhañ diouzh ar c'hiz savouriezh klasel. En ^{XIX}vet kantved e voe savet un iliz, koc'huiou ha straedoù nevez, ar pezh a lakaas Kastell-Geron da cheñch anez ober dezhi koll he neuz unvan.

Ti an Douristed
Ar C'hastell - 16 straed Roazhon
35410 Kastell-Geron
Pgz : +33 (0)2 99 37 89 02
office.tourisme@cc-payschateaugiron.fr
www.tourisme-payschateaugiron.fr

Kastellaodren



Lec'h treizh war al Leñv.
Kêr-gastell gwarezet gant an dour.



Emañ Kastellaodren en ul lec'h ma teu hentoù pouezus eus Breizh da groaziañ an eil re ar re all, hag a-viskoazh eo bet ul lec'h strategel hag ul lec'h bevañ priziet a-hed ar Stêr-Leñv. Da gentañ e oa ur c'hreñvlec'h, ha dre al lañs a oa gant ar c'henwerzh hag an artizanezh enni e teuas da vezañ kêr-benn istorel Bro-Oueloù. En ^{XX}vet kantved, p'en em stalias ar Petit Echo de la Mode hag e labouradeg patromoù, e voe lakaet da eil kêr-benn ar c'hiz doare Bro-Frañs.

Kregiñ a reas istor Kastellaodren war an dosenn lec'h ma oa ar c'hastell kozh n'eus ket anezhañ ken. Savet e voe gant ar c'hont Aodren en ^{XIV}vet kantved. Diskennidi Aodren a lakaas menec'h Sant-Maglor, eus Lehon, da sevel eno ur prioldi hag ur vourc'h izeloc'h. Abalamour m'edo kêr en ul lec'h treizh eus ar re bennañ e voe tapet lañs ganti a-fet

kenwerzh hag artizanezh, ha dont a reas neuze da vezañ kêr-benn Bro-Oueloù. E-kerzh an ^{XVIII}vet kantved e oa eno un ehan pouezus evit ar post hag ur marc'had meur evit an neud. D'ar mare-se e voe savet ur "blasenn vras", plasenn ar Republik hiziv an deiz, gant tiez-annez uhel o lukanoù dibar tro-dro dezhi. Gant ar c'harter a zo en-dro da iliz Sant-Maglor (^{XVIII}vet kantved) e weler an doare ma oa bet stummet kêr Kastellaodren gant he straedoù strizh, he flasennigoù hag he ziez o zoennoù garbet war zinaou. Abalamour d'an obererezhioù artizanezh ha d'an endro fest a veze er c'harter-se e oa bet lakaet da "garter latin" gant ur Parizian a oa o tremen eno, ha chomet eo al lesanv-se abaoe ! Dre blasenn al Leñv, a zo bet adkempennet penn-da-benn ha pavezet, ez eer betek monument kaerañ ar gumun, chapel Itron-Varia ar Run. Savet e voe e penn kentañ ar ^{XIV}vet kantved. Kavout a reer enni lambruskoù livet rouez-kenañ (132 daolenn).

Ur roll a bouez he deus bet ar stêr en istor kêr. Dre ur reizhiad kemplezh dre zour he deus gwarezet ar c'hreñvlec'h hag ar gêr izeloc'h, lakaet rodoù ar milinoù da dreñ e-pad kantvedoù, a-raok lakaat troellrodoù Le Petit Echo de la Mode da vale adalek 1920. Bep bloaz e vez savet un diskouezadeg e-barzh an endro greantel espar-se, e-mesk ar metal riñvedet, ar brikenoù hag ar betoñs, evit degas da soñj eus istor ar magazin brudetañ a zo bet war dachenn ar gwrierezh. A-hed ar stêr ez eer da-heul ar c'hiz ![≡]

Ti an Douristed
e Bro Kastellaodren
31 straed an Ti-gar
22170 Kastellaodren
Pgz : +33 (0)2 96 79 77 71
otchatelaodren@orange.fr
www.cdc-chatelaodren-plouagat.com

Komborn



Lec'h treizh war al Linon.
Kêr relijiel savet gant ar
Vretoned ha kêr-gastell e
Marzoù Breizh, gwarezet
gant an dour.

Ul lec'h dudius a-feson eo Komborn evit chom da lojañ e-pad ur pennad, ha neuze mont ac'hano da vizitañ ar maezioù garzhaouek pe da bourmen e bord ar mor. Nerzh ha kevrin ar c'hreñvlec'h greunit gant e adsked e dourioù e Lenn Sioul a gengej gant hoal ar straedigoù ha gant tommder tiez o bannoù-koad hag a laka anat daouelezh kêr : ur gêr-gastell e Marzoù Breizh e-touez un endro naturel romantel.

War-lerc'h prezeg ar manac'h sant Luner, deuet eus Iwerzhon, e voe savet un iliz kentañ er ^{VI}vet kantved, diwar-se e teuas bourc'h ar barrez. En ^{XI}vet kantved e lakaas arc'heskob Dol sevel ur c'hastell e Komborn, lec'h ma 'z eas e vreur yaouank Riwallon da chom. Peogwir e oa gwarezet mat al lec'h neuze e voe roet lañs d'un eil kêr : bourc'h an aotrou. Goude-se e c'houlennas Riwallon digant menec'h veneadat dont da sevel ur prioldi e 1065, a voe savet un trede pol en-dro dezhañ : bourc'h ar prioldi. Etre ar ^{XVI}vet hag an ^{XIX}vet kantved e voe adsavet an iliz hag adaozet diabarzh ha talbenn ar c'hastell; kreskiñ hag en em astenn en he hed a reas kêr pa'z erruas an hent-houarn betek enni. E bourc'h ar barrez hag an aotrou e weler an diwezhañ tiez o bannoù koad hag an ti a reer "ti al Letern" anezhañ (^{XVI}vet kantved) e-kichen an talbennoù adkempennet en ^{XIX}vet hag ^{XX}vet kantved, tra ma ne hañval ket karter ar prioldi kozh, pelloc'h eget ar c'hastell, bezañ cheñchet ouzhpenn 300 vloaz zo.

Ti an Douristed
Ti al Letern
23 plasenn Albert Parent - BP 1
35270 Komborn
Pgz : +33 (0)2 99 73 13 93
ot@combourn.org
www.combourn.org

☞ Eus pell e vez sachet ar selloù kerent etrezek melloù tourioù ar c'hastell. Diwar e hent-ged kranellet ez eus ur gwel kaer war ar park, kêr hag al Lenn Sioul. Dalc'het ez eus bet soñj eus François-René de Chateaubriand el lec'h-se hag a zo chomet heñvel a-hed ar bloavezhioù, ar pezh a zegas da soñj deomp eo bet maget ar Romantelezh ivez, koulz e Breizh hag e Bro-Alamagn, diwar arvestiñ ouzh ar mein kozh hag ouzh an amzer o vont hebiou... Eus an iliz betek ribloù al lenn awenet ez eer da zispenn roudoù ar skrivagner meur.☞

ar Gemene

Lec'h pont.
Kêr-gastell doare « roc'h kreñv ».



Ouzh troad ur voudenn-gastell, souchet e-barzh saonioù war ribl ar Skorf, eo bet diazezet ar Gemene, anezhi ur gêr eus ar Grennamzer hag a zo tost mil bloaz. Gwelet a reer, gant an dismantroù bras a chom eno, pegen pinvidik eo bet istor priñsed Roc'h-an-Gemene. Abaoe 1377 e oa kêr e dalc'h ar re Roc'h-an, ha lakaet e voe da briñselezh dre ul lizher-aotren a-berzh Charlez IX e 1570. Unan eus familhoù meur Bro-Frañs e oa familh priñsed ar Gemene ha kalz a bouez he doe betek an Dispac'h.

Savet e voe ar Gemene e-kerzh hanterenn gentañ an ^{XIV}vet kantved gant an aotrou Gwegan, a ziazezas eno e gemened (da lavaret eo e gomandiri, diwar-se anv kêr). Buan-tre e voe graet berzh gant kêr. Desachet e veze ur bern tud gant ar foarioù bras. Kavet e vez kalz relegoù eus an amzer dremenet a-hed un hentad glad. Sachet e vo selloù ar vizitourien lemm o lagad gant framm ar gêr deuet eus ar Grennamzer : pigonoù er straedoù, tiez o bannoù koad, stumm hir an tachennoù, al lez-varn gozh, ti ar Senesal, klañvdi, straedigoù souezhus, liorzhoù gant savennoù-douar. Ouzhpenn bezañ anavezet evit he savadurioù kaer ha pinvidik, ez eo ar Gemene ul lec'h brudet-kenañ a-fet gastronomiezh. Eno e vez tañvaet anduilh ar Gemene, ur meuz brudet ma'z eus, krampouezh ha sistr d'o heul, galetez avaloù-douar ken anavezet er Vro Pourlet. Gallout a reer evañ ur bannac'h pe debrñ e-barzh ostalerioù dudius, enno un endro plijus gant sonerezh da-heul a-wechoù.

☞ Emañ ar Gemene war vord ar Skorf, ur stêr gaer hag a dremen a-dreuz traoñiennoù ken kaer all. A-hed ar ribloù e kaver tiez eus ar re vrapañ a bep eil gant manerioù, chapelioù, feunteunioù... ha kement a zo chomet war-lerc'h ar briñsed Roc'h-an-Gemene. Ar begoù lipous hag ar re a blij an traoù souezhus dezho na c'hwitont ket gwech ebet goul an anduilh (d'an eil dibenn-sizhun goude ar 15 a viz Eost), yaouvezhioù ar Gemene e-pad an hañv ha bep eil bloaz d'ar Pantekost, Enez ar Vro-Pourled a zo brudet evit kalite an arvestoù hag e endro liesliv.☞

Ti an Douristed
ar Roue Morvan (skourr)
"Café pointu"
Straed Haha
56160 ar Gemene
Pgz : +33 (0)2 97 39 33 47
ot-guemene@orange.fr
www.tourismepaysroimorvan.com

Gwerliskin



Kêr-gastell eus Bro-Dreger, war ar vevenn gant Bro-Leon ha Bro-Gerne.



Brav eo Gwerliskin da welet, ha lakaet eo er rumm « 3 bleuñvenn ». Gant an doare pizh m'eo kempennet an takadoù glas hag ar monumantoù e tegaser un tamm freskded en-dro d'ar greunvaen a gaver e pep lec'h. Bleuñvegoù ha poullou bleuñvet o livioù kaer, liorz al louzeier, Tachenn ar Soudarded, anezhi ur c'hoariva glasvez bihan savet e-touez dismantrou chapel Sant Ener... ; kement tra a ya d'ober hentoù-bale dudius e-kreiz an istor.

Emañ an darn vrasañ eus ar savadurioù, anezho monumantoù ha tiez-anez kozh neuziet-kaer e greunvaen, en-dro d'ur blasenn hir ma kaver ul lodenn vat eus ar staliou-kenwerzh kantvedoù zo. Berzh he deus graet ar gêr-se evel ul lec'h brudet mil bell zo evit ar foarioù hag ar marc'hadoù, ar pezh a weler splann gant pinvidigezh he glad savadurel.

Savet e oa bet Gwerliskin e-kreiz an ^{XIV}vet kantved e-kichen ur vouden feodel. E 1434 e voe roet dezhi, gant dug Breizh, ar gwir da gaout pouezioù ha balañsoù, ha lakaet e voe da gêr. Delc'her a reas ar c'henwerzh da dapout lañs er ^{XVI}vet kantved, diwar-se e voe savet koc'hioù kentañ e koad, ul lez-varn a-us dezho, hag ar « maen gaou » evit muzuliañ ar greun. Er ^{XVII}vet kantved e voe solutaet roll Gwerliskin war dachenn ar marc'hadoù hag ar justis ; savet e voe toull-bac'h an aotrou, a vez graet ar Prezidial anezhañ ivez, e 1640, gantañ stumm ur c'hreñv bihan. En ^{XIX}vet kantved e voe savet ur c'hoc'hu greunvaen e-plas an hini koad ha kresket e voe an iliz eus ar ^{XVI}vet kantved en ur zoujañ ar stil orin. A-drugarez d'ur c'horfuniad benerien hag a oa kreñv er gêr-se ez eus bet savet, a-hed ar c'hantvedoù, ur glad savadurel eus ar c'hentañ troc'h. Hiziv an deiz c'hoazh e weler tiez nobl en-dro d'ar plasennoù a zo an eil da-heul eben e Gwerliskin, tra ma kaver tiez ar vicherourien, disteroc'h o stumm, a-hed ar straedoù a ya kuit ac'hano war-zu ar c'hostezioù.

Ti an Douristed (e-pad an hañv)
Plasenn ar Prezidial
29650 Gwerliskin
Pgz : +33 (0)2 98 72 84 20
guerlesquin@tourisme.morlaix.fr
www.guerlesquin.fr

Josilin



Lec'h war an uhel ha lec'h treizh war an Oud.
Kêr-gastell doare « roc'h kreñv ».



Daou du zo da gêr ar re Roc'han ! Emañ a bep tu d'an Oud ha betek an Dispac'h e oa rannet etre daou eskopti : hini Sant-Maloù en norzh d'ar stêr, lec'h m'emañ kêr an nec'h ; hini Gwened er su, eno tachenn bourc'h prioldi ar Groaz Santel hag hec'h aridennad tiez o bannoù koad liesliv war an hent da bignat betek ar santual. Unan eus ar re voemusañ e Frañs e-touez ar re a zo savet e greunvaen eo kastell Josilin. Diouzh tu an Oud e tiskouez tres ur c'hreñvlec'h eus ar Grennamzer ; diouzh tu al liorz eo un ti-anez dudius fichet e doare flammek fin ar marevezh gotek. Prest eo Josilin, ha hi ganet mil bloaz zo diwar kejadenn ar mein gant an dour, ar greunvaen gant an Oud, al laik gant ar relijiel, d'ober he zreuz en amzer-da-zont.

Un arsav a bouez eo Josilin war hent duged Breizh. P'en em gaver e pleg an hent e weler anezhi, ouzh tor an dosenn, ouzh he zroad ar pezh mell kastell bet savet gant ar re Roc'han, anezhañ ur c'hreñvlec'h na c'hall ket bezañ kemeret, sonn war ar reier, ul lec'h stag-mat ouzh buhez Josilin.

Savet e voe Josilin en ^{XI}vet kantved gant beskont ar Porc'hoed en-dro d'ur vouden feodel a oa war ur beg roc'hellek, ha d'an tri frioldi ar Groaz Santel, Sant-Varzhin ha Sant-Nikolaz. Distrujet e voe ar c'hastell war urzh Herri II Plantajened, hag adsavet e voe, e fin an ^{XII}vet kantved, ur c'hastell maen hag a greskas tamm-ha-tamm. Savet e voe mogerioù-kreñv en-dro ola gêr ; war-dro 1500 e voe savet un annez nevez gant Yann II Roc'han. Berzh a rae Josilin etre ar ^{XV}vet hag an ^{XVIII}vet kantved gant he fabrikoù mezher, he staliou kivisterezh, he foarioù. Koll a reas lusk e fin an ^{XVIII}vet kantved a-raok adtapout lañs en ^{XIX}vet kantved pa voe kaniet an Oud ha pa grogas kehelerezh ar Werc'hez Vari da dapout brud. E pleg ur straedig bennak e vo plijet ar vizitourien gant ar gêr-se eus ar Grennamzer ma ya ar glad savadurel kozh asambles gant an traoù nevez. Gallout a raint a-giz-se bizitañ ar c'hastell hag an iliz Itron-Varia an Drein, arvestiñ ouzh kêr diwar ar c'hloc'hdi, ha gwelet neuze un hanter-kant bennak a diez o bannoù koad, a zo an hini koshañ anezho eus ar bloaz 1538.

Ti an Douristed
Bro Josilin
26 straed an Tregont
56120 Josilin
Pgz : +33 (0)2 97 22 36 43
ot.josselin@wanadoo.fr
www.josselin.com

Lanyugon



Lec'h kemerñ.
Kêr-gastell gwarezet gant an dour.



Ganet eo Lanyugon en ur saonenn don, sko ouzh ur stank hir ha brav pevar c'hilometr dezhañ. Emañ evel un oaz e-kreiz ur mor a c'hlasvez. He glad savadurel, gant an tiez-anez greuvaen ha plasenn kreiz-kêr, a zegas da soñj d'an dud eus amzer dremenet lorc'hus Lanyugon, pa oa ur c'hreñv er Pentevr da vare duged Breizh.

Kement tra hag a sell ouzh istor Lanyugon, anezhi perlezenn ar Pentevr, zo liammet gant an dour. Gwechall e oa un dra a bouez evit an difennoù, hiziv an deiz e vez priziet kalz evit an touristerezh hag an dudiamantoù. Ken dudius ha sioul eo ar gêr-se ken e vefed techet d'ankouaat he doa bet ur pouez a-fet strategiezh en istor Breizh. War ur voundenn edo gwechall kastell Lanyugon, a oa difennet gant daou stank. Dismantret e voe da vat e penn

kentañ ar XVII^{vet} kantved, goude-se e voe dilaosket bourc'h an aotrou tamm-pe-damm : e-lec'h ar c'hastell hag e zifennoù e kaver diwar neuze an Ostel Sevoy hag e ginkladurioù kaer. Dont a reas bourc'h ar marc'had da vezañ kalon ar gêr. Kompren a reer e oa lañs gant Lanyugon gwechall pa seller ouzh an tiez pinvidik e greuvaen, bet savet diouzh doareoù klasel ar XVII^{vet} ha XVII^{vet} kantved, a zo bodet en-dro da blasenn ar Martred. E bourc'h ar prioldi, a zo un tamm a-gostez, emañ bepred chapel ar prioldi, deuet da vezañ an iliz abaoe. Gant an endro dibar-se ez eo Lanyugon, hiziv an deiz, ul lec'h brudet evit tremen ur pennad amzer vak en Argoad, lec'h ma kaver war un dro obererezhioù liammet gant an dour, obererezhioù dindan an amzer pe liammet gant ar glad. Ul lec'h m'en em gav ar besketaerien hag a valeerien eo Lanyugon, hag adtapet he deus tamm-ha-tamm ul lodenn eus he brud gwechall.

≡ Adalek an XIII^{vet} kantved o doa gouezet tud Lanyugon doñvaat ar gwazhioù a gaver a-leizh en draoñnienn evit ober eus o c'hêr gwir batrom ar c'hreñvlec'h e zifennoù dour. Dont a rae an div stêr a dremen eno, ar Rozed hag an Argenon, da bourchas dour d'an daou stank bras a yae da wareziñ ar c'hreñvlec'h a oa bet savet war ur voundenn, ha d'ober difennoù ivez, dre o c'hanoù-foll, evit bourc'hioù ar marc'had hag ar prioldi. Emañ an dour e pep lec'h e Lanyugon. Ha pa 'z eus bet lamet ur stank diwar an daou a oa gwechall, en-dro d'an hini a zo chomet ez eus bremañ ur greizenn dudioù en diavaez ma vez kinniget obererezhioù a bep seurt. ≡

Ti an Douristed
Plasenn ar Martred
22270 Lanyugon
Pg : +33 (0)2 96 31 70 75
tourisme.jugon.les.lacs@wanadoo.fr
www.jugon-les-lacs.com

ar Roc'h-Bernez

Lec'h war an uhel ha lec'h kemerñ.
Kêr-gastell doare « roc'h-kreñv ».



Pintet eo ar Roc'h-Bernez war ur beg-douar roc'hellek, a-us ar Gwilen. Neb a glasko mont etrezek enni a ray anaoudegezh gant he zeñzorioù. Dav eo da gentañ soñjal er mareoù ma c'halled sevel pell en douaroù gant ar stêr diazez-se, da-heul al lanv, ha goude-se digeriñ e zaoulagad evit bevañ en-dro amzerioù kaerañ kêr, da vare ar varoned hag ar bigi dre lien. Osteloù prevez, etrepaouezioù kozh, grignolioù holen ha kement zo, ur bern testenioù eus an amzer gwechall zo da zizoleiñ e pleg ar straedigoù...

War-dro ar bloavezh mil e savas Bern Hart, ur penn-brezel viking anezhañ moarvat, er Gwilen. Merzout a reas ar beg-douar-se, etre ar stêr ha porzh ar Rodoer, ha neuze en em stalias eno abalamour ma oa ul lec'h strategel a-zoare. Lakaet e voe e ziskennidi, deuet da vezañ kristenien, da varoned, ha ganto e veze evezhiet an tremenerezh war ar Gwilen. Krouiñ a rejont ur vourc'h-kastell, ha

goulenn neuze e 1063 digant abati beneadat Redon diazezañ ur prioldi eno, un tamm pelloc'h war-zu an norzh. Edo ar voundenn feodel hag ar vourc'h-kastell lec'h m'emañ ar Ruikard, war ar beg-douar. E-kerzh ar Grennamzer e voe tapet muioc'h-mui a lañs gant ar porzh, ar pezh a weler mat gant ar grignolioù holen, e straed an Haleneri, an etrepaouezioù war ar porzh hag ar c'hoc'huiou war blasenn Bouffay a zo chomet war-lerc'h ar mareoù berzh-se. Er XVI^{vet} kantved e teuas ar Roc'h-Bernez da vezañ ur c'hreñvlec'h protestant dindan levezon ar baron François de Coligny. Endro da blasenn Bouffay ec'h adkaver meur a ostel prevez eus ar c'houlz-se, ganto gizioù gotek hag an Azginivelezh mesk-ha-mesk. Mont a reas oberezhioù ar porzh war zigreskiñ e penn kentañ an XX^{vet} kantved abalamour da gevezerezh an hent-houarn a oa krog da dapout lañs. Gallet he deus ar Roc'h-Bernez avat, gant an tremenerezh war an hentoù hag an touristerezh, delc'her da vezañ ul lec'h degemer ma vez debret mat.

≡ Dre ar straedigoù a gaver a-leizh eus an iliz, e penn-nec'h ar gêr, betek ar porzh, e c'haller mont da gantren er c'harterioù kozh lec'h m'emañ ene ar Roc'h-Bernez. A-dreñv porchedoù rikamanet e tizoloer atalieroù arz ha souezhadennoù evel mirdi ar Gwilen mor e-barzh kastell ar Soubitou, anezhañ ur mell ti-anez eus ar XVII^{vet} kantved, pemp estaj dezhañ, bet savet ouzh tor ar roc'h. Emañ war valir a-us porzh ar Rodoer hag e vigi kozh. Poent eo mont e bourzh ! Diwar ar stêr diazez e vezer bamet muioc'h c'hoazh gant stumm ar Roc'h-Bernez. ≡

Ti an Douristed
Bro ar Roc'h-Bernez
14 straed an Dr Cornudet
56130 ar Roc'h-Bernez
Pg : +33 (0)2 99 90 67 98
office.tourisme.lrb@arcsudbretagne.fr
www.tourisme-pays-la-roche-bernard.fr

ar Roc'h-Derrien



Lec'h war an uhel ha lec'h treizh e deun aber ar Yeodi.
Kêr-gastell doare « roc'h-kreñv ».



Savet e oa bet kêr en ^{XIV}^{vet} kantved war ur beg-douar roc'hellek war valir a-us aber ar Yeodi, gant Derrien, mab da gont ar Pentevr. Lakaat a reas sevel ur c'hastell-kreñv difennet gant ramparzhioù evit kontrolliñ an tremenerezh war ar stêr-vor. E-kerzh brezelioù hêrezh Breizh e voe preizhet ar c'hastell ha lakaet seziz warnañ a bep eil, ha diskaret e voe meur a wech. Eno e voe gloazet ha tapet Charlez Bleiz da brizoniad gant ar Saozon da-geñver an emgann brudet a zegouezhas er Roc'h-Derrien e 1347. E 1356 e voe roet kastellanezh ar Roc'h-Derrien d'ar Gwesklin a voe lakaet da veskont. Diskaret e oa bet ar c'hastell hag ar ramparzhioù e 1420, da vare an dug Yann V, ha freuzet e voe da vat dre urzh Richelieu er ^{XVII}^{vet} kantved.

Gallout a reer lenn istor ar Roc'h-Derrien en dismantrou eus ar Grennamzer : porzh kozh an Ospital, Plasenn Post an Dalc'h, gardenn ar Saozon, ar c'hardenn Arc'hant. E straed ar Feunteun e kaver

roudoù, gant ar prenestroù staligoù, eus ar stalioù kenwerzh a oa eno gwechall. Rannet eo kêr etre div lodenn : traoñ kêr a vez graet « traou ar pont » anezhañ, lec'h ma kaver ar bilhaouerien hag a ra ur gwir « dropad » liesliv, hag an doerien o luc'haj dibar a reer « tunodo » anezhañ (ar porzh, unan eus ar re goshañ war aod an norzh, a rae berzh gant kenwerzh an holen hag ar gwin, ha diwezhatoc'h gant hini ar mein-glas a veze tennet e mengleuzioù ar c'hornad) ; ha diouzh an tu all krec'h kêr, gant Plas-Kêr hag he ziez o bannoù koad eus ar ^{XV}^{vet}, ^{XVI}^{vet} ha ^{XVII}^{vet} kantved. Diwar ar voudenn feodol ez eus ur gwel kaer-tre war ar Roc'h-Derrien, aber ar Yeodi ha Kastell Du. E-barzh iliz mogeriet Santez Katell, eus an ^{XIII}^{vet} kantved, e c'haller gwelet ur werenn livet kaer a zo taolennet warni Charlez Bleiz paket gant ar Saozon. Dre ar savadurioù bras tro-war-dro, graet gant mein ar vro, e weler penaos e reas kêr berzh betek kreiz an ^{XX}^{vet} kantved gant he stalioù kenwerzh, hec'h artizanet, ar mein-glas hag al lin. E Bro-Dreger hiziv an deiz c'hoazh eo anavezet he lesanv « Kapital Stoub », da lavaret eo kêr-benn an deilhaerien lin.

≡ Merket eo bet ar Roc'h-derrien gant buhez labourus meur a gumuniezh artizanet ha kenwerzhourien. « Da-heul Yann, roue ar bilhaouerien » ez eer d'ober anaoudegezh gant sekredoù kuzh glad ar Roc'h. War ribloù ar Yeodi, pe e vefed war-droad pe e bourzh ur c'hanoë, e teu da soñj d'an dud eus ar bigi dre lien a zegase pinvidigezhioù da gêr. E-pad an hañv, e liorz ar presbital hag e garreziou plant, lec'h ma vez kinniget diduamantoù war labour al lin, e vez degaset da soñj eus ar mare ma oa troet ar c'hornad war an danvez-se. Ha dont a ra an istor da vezañ un digarez da gaout plijadur pa vez foarioù ar c'hozhigelloù, ar gouel bloaziek ha gouel ar Grennamzer. ≡

Ti an Degemer Bro ar Roc'h
10 Plas-Kêr
22450 ar Roc'h-Derrien
Pgz : +33 (0)2 96 91 59 40
tourismepaysrochois@orange.fr
www.larochederrien.com

ar Faou



Lec'h treizh e deun un aber.
Kêr-gastell.



≡ E-pad ar maread touristerezh eo digor an Ti-Bro (eus ar ^{XVI}^{vet} hag an ^{XVIII}^{vet} kantved) ; ul lec'h a-feson eo hag a c'haller mont ac'hano d'ober gwelloc'h anaoudegezh gant istor ar Faou. Gant un diskouezadeg pad ha re all berrbad e konter deomp eno istor kêr, an obererezhioù a vez enni, ar gizioù hengounel. Da bep hini goude-se da vont diouzh e faltazi da vale er straed vras he ziez kozh ha d'aveliñ e spered a-hed ar c'haeoù. ≡

Un ehan evit ar post etre Goueled-Leon ha Kerne-Uhel e oa ar Faou, a zo ivez ur porzh digor war Morlenn Brest hag un ode etre an douar hag ar mor. Diwar gement-se e teu hec'h istor hir hag he glad pinvidik.


Daoust d'ar Faou da vezañ bet ur gêr feodol er penn kentañ, eo troet pell zo da vezañ dreist-holl ur gêr a genwerzh, ar pezh a weler mat gant plasenn an Ti-kêr, ur mell hini ma'z eus. Pa ziskenner gant ar straed vras e weler un aridennad tiez o bannoù koad hag o fignonoù (^{XVI}^{vet} kantved) hag a ziskouez e oa stummet ar gêr evit lakaat ar stalioù-kenwerzh a-wel d'ar veajourien. E-kerzh ar c'hanvedoù ez eus bet lakaet pep a wiskad mein-glas oberiet fin ouzh an talbennoù, ar pezh a zegas un tres dibar da bep ti. N'eus ket nemeur a gêrioù e Breizh lec'h ma'z eus bet dalc'het tiez seurt-se, hag ar Faou zo unan anezho. E penn ar straed-se hag he stalioù emañ chapel ar Salver (^{XVI}^{vet} kantved), unan souezhus ma'z eus, sonn e deun aber ar Stêr Gozh. Diwar ar pont lec'h ma tremen an hent kozh etre Brest ha Kemper eo brav mont da vale a-hed kae Kelenn, a oa gwechall ur porzh aocherezh bras e Morlenn Brest. Hiziv an deiz e talc'h ar Faou da vezañ ul lec'h ehanañ evel m'eo bet a-viskoazh, war un dro an nor da vont war-zu Gourenez Kraozon ha lec'h degemer Park an Arvorig.

Ti an Douristed
Stêr-Aon an Arvor
39 straed ar Jeneral de Gaulle
29590 ar Faou
Pgz : +33 (0)2 98 81 06 85
tourisme@cc-aulne-maritime.fr
www.cc-aulne-maritime.fr

Lehon



**Lec'h war an uhel ha lec'h treizh
e deun un aber.**
Kreizenn relijiel bet savet gant ar Vretoned.



E Lehon, a zo e traoñienn dibar ar Renk, ez eus bet miret ur glad istorel ha relijiel hag a zegas da soñj, gant o dismantrou, eus ar roll pouezus a oa gant ar vourc'hadenn-se er Grennamzer. Plijet-kaer e vez ar vizitourien, a zeu niverus betek eno abaoe an **XIX^{vet}** kantved, gant an abati beneadat bet savet en **IX^{vet}** kantved gant Nevenou, ar c'hastell eus an **XII^{vet}** kantved war an duchenn a-us ar pont, ha tiez ar vourc'h.

Stummet eo bet tres Lehon da gentañ-penn gant ar venec'h a ziazezas o manati en ur gildroenn eus ar Renk. Roet e voe kalz a sikourioù d'ar manati gant ar roue Nevenou hag an aotrouien. Brudet-mat e oa er bed relijiel, betek mare an Dispac'h pa voe serret, abalamour ma oa ennañ relegoù sant Maglor. Savet e voe ur c'hreñvlec'h eno gant aotrouien Dinan, war an duchenn roc'hellek, evit diwall madoù an abati hag ar monedone war ar Renk. Dispennet e voe ar c'hastell er **XVII^{vet}** kantved. Emañ Lehon war vord ar Renk ha war an hent etre Dinan ha Roazhon, ar pezh a reas d'ar c'henwerzh ha d'an eskemmoù tapout lañs. Berzh a rae an artizanelezh eno : produiñ lien d'ober gouelioù, stalioù kivijerezh, stalioù kenwerzh. Gwelet a reer war an tiez e oa aezamant a-walc'h : rizennoù kinklet gant moulladurioù ha gourinoù kizellet. En **XIX^{vet}** kantved e voe savet ar c'harrbont da zihañ-chañ an tremenerzh etre Dinan ha Roazhon, da-heul kement-se ez eas ar c'henwerzh war ziskar er vourc'h. Hiziv an deiz ez eus gallet e Lehon lakaat ar savadurioù nevez da juntañ d'ar re gozh, ha delc'her soñj eus an amzer dremenet ha bezañ digor war un dro war an amzer a vremañ.

**Ti an Douristed
Dinan – Traoñienn ar Renk
9 straed ar C'hastell - BP 65261
22105 Dinan Cedex
Pgz : +33 (0)2 96 876 976
infos@dinan-tourisme.com
www.dinan-tourisme.com**

≡ Hervez ar vojenn : "pa zouaras ar bark, a oa karget ennañ relegoù sant Maglor bet laeret gant ar venec'h war Enez-Sark, war ribl ar Renk e Lehon, e teuas al lec'h da vezañ unan dudius ha bleunvet evel ar baradoz. Diwar neuze e teredas ar birc'hirined eus Arvorig a-bezh hag eus kornôg Galia evit gwelet ar burzhud-se". Hiziv an deiz e c'haller gwelet ar burzhud adarre : diskouez a ra an tiez, ar straedoù hag ar straedigoù un aridennad livioù ha dudioù, peadra d'ar vizitourien da vezañ bamet.≡



Lec'h war an uhel.
Kreizenn relijiel bet savet gant ar Vretoned.



Kludet eo Lokorn ouzh tor he menez, gant he ziez sonn e greunvaen glas ouzh troad tour karrez an iliz, piltosek ha digenvez. Ul lec'h brudet-kaer eo e bed an touristerezh e Breizh, ha plijout a ra d'ar severerien filmoù, arabat ankouaat e oa ul lec'h sakr da gentañ, ha goude-se kêr-benn al lien-gouel e Breizh, eus fin ar **XV^{vet}** kantved betek kreiz an **XVII^{vet}**.

Testenioù brav eus istor Lokorn eo an tiez-anez kaer a zo war ar Blasenn Vras en-dro d'an iliz-prioldi. Un neved keltiek meur e oa, kristeniekaet e voe er **VII^{vet}** kantved gant sant Ronan ha savet e voe ur gêr eno ouzh troad ar menez, en-dro d'ur palez. Sur a-walc'h e voe rivinet gant an Normaned ha se zo kaoz e voe adsavet an annezioù el lec'h ma oa peniti Ronan. Troet kalz gant ar relijion e oa konted Kerne, ha duged Breizh diwezhatoc'h, dre-se e voe savet un iliz romanek kentañ, goude-se ur prioldi beneadat, hag evit echuiñ un iliz-prioldi er **XV^{vet}** kantved. Diskarget e voe kêr Lokorn eus tailhoù zo gant an duged hag en em staliañ a reas eno ul labouradeg wiaderezh vras evit al lien-gouel. Kavout a reer roudoù eus an obererezh-se gant an tiez a zo war ar blasenn : burev al lien, ostel Kompagnunezh an Indez, tiez ar varc'hadourien, an notered, ar gontrollerien a-berzh ar Roue, an ofiserien...

≡ Ur c'hemm bras zo etre an iliz-prioldi gouestlet d'ar preder er sioulder, hag ar birvilh a vez hiziv an deiz er gêr gozh, lec'h ma kaver pourmenerien e-plas ar baraman-tourien a zeue da gerc'hat lien-gouel evit o bigi da vont war-zu ar Bed Nevez, lec'h ma kaver traoù lipous mod ar vro e-plas al lien-gouel a gase an dud da-heul avel an avanturioù. Pa 'z eer pelloc'h, en tu all d'ar banelloù, ez eer da zispenn roudoù an holl re a zo pignet gant ar menez sakr e-kerzh daou vil pemp kant vloaz Istor.≡

**Ti an Douristed
Kemper-Lokorn
Lec'hiad Lokorn
Plasenn an Ti-kêr
29180 Lokorn
Pgz : +33 (0)2 98 91 70 14
tourisme@locronan.org
www.locronan.org**

Lokorn

Malastred



Emañ Malastred e pleg ur gildroenn serzh adkemberet eus an Oud. Krouet e oa bet en ^{XIV}vet kantved e skeud ur voudenn feodel, hag a yeas war-lerc'h da gastell-kreñv, savet war un enezennig en unan eus gwazhennoù ar stêr evit kontrolliñ un treizh. Er ^{XV}vet kantved e teuas ar gêr-se da vezañ unan eus an nav baroniezh a oa e Breizh, ha savet e voe mogerioù-kreñv en-dro dezhi hag a chom un toullad dismantrou anezho c'hoazh. Er ^{XVI}vet kantved e voe savet daou skluz gant saz, e-touez ar re gentañ e Frañs, abalamour da c'hallout mont eus Malastred da Redon ; diwar neuze e voe tapet lañs gant ar c'henwerzh ha war ar memes tro gant ar gêr he Bezantennoù Aour...

« Quae numerat nummos non malestrica domus », an hini a vez o kontañ e vezantennoù n'eo ket eus Malastred. Diskouez a ra lugan kêr e fell d'an dud ac'hann degemer ar vizitourien evel zo dleet. War blasenn Bouffay e chom testenioù eus an amzerioù gwechall pinvidik da vare ar C'hroaziadegoù pe pa rae berzh ar c'henwerzh dre ar stêr, evel an tiez bourc'hiz cheuc'h e greunvaen kizellet hag an tiez o bannoù koad, souezhus gant o delwennigoù espar : ar wiz a zo o nezañ, ar c'had a son ar binioù, ar pillikant a zegas da soñj eus fablennigoù ar Grennamzer. Eno emañ ivez iliz Sant Jili (^{XII}vet, ^{XV}vet ha ^{XVI}vet kantved) a dalvez ar boan gwelet anezhi. Pevar fabourz zo bet savet en-dro d'ar c'hreiz-kêr istorel ha da zismantrou he mogerioù er gêr gloz. Dre straedigoù strizh ez eer betek kanol Naoned-Brest, ar skluz ha hent ar ganol, ha pelloc'h war-zu ar maezioù a-zivwar-dro, ha dreist-holl chapel ar Vadalen lec'h ma voe degemeret, e 1343, ar re a sinas un dreverz e-kerzh ar Brezel Kant Vloaz.

Lec'h treizh er pellañ ma c'hall ar bigi tremen.
Kêr-gastell gwarezet gant an dour.



☰ Gant hec'h istor hag he lañs war dachenn ar c'henwerzh ez eo brasoc'h Malastred eget na vefe soñjet ! Adalek ribloù an Oud en em sil straedoù kozh betek ar gêr gloz etre an talbennoù maen hag an tiez o frammoù-koad. Graet e vez anaoudegezh gant ar gêr-se mil bloaz dezhi, a reer « Perlezenn an Oud » anezhi, dre delwennoù souezhus hag a zo evel un testi eus un istor tousmac'hus hag eus ur c'henwerzh hag a rae berzh gwechall. ☰

**DegemerTouristerezh
Le Pass'Temps
7 straed Santez-Anna
56140 Malastred
Pgz : +33 (0)2 97 75 45 35
tourisme-malestroît@orange.fr
www.malestroît.fr**

Monkontour



Lec'h kemeriñ war an uhel.
Kêr-gastell doare « roc'h-kreñv ».



Kludet sonn eo Monkontour ouzh he zarroz roc'hellek, lec'h ma teu div stêr vihan da gemberañ an eil gant eben. Gronnet eo bepred gant mogerioù-kreñv bras eus an ^{XIII}vet hag ar ^{XIV}vet kantved. Liv an amzer eno a ra d'ar vuhez bezañ c'hwek ha plijus. Koadeier en trowardroioù, plant skedus, ur gêr sioul ha didrouz eo : ur c'hemm bras neuze gant istor tousmac'hus ar c'hreñvlec'h solut-se eus ar Pentevr, a voe taget meur a wech er Grennamzer, ha lec'h ma veze kognet pezhioù-moneiz zoken er ^{XIV}vet kantved !

Savet e oa bet ar wikadell-se en ^{XIV}vet kantved evit difenn Lambal, kêr-benn ar Pentevr, diouzh tu ar c'hreisteiz. Dispennet e oa bet dre urzh Richelieu e 1626, daoust da se ez eus chomet traoù war al lec'h : ar ramparzhioù hag unnek tour hag a oa war ar voger-dro gozh. Pa weler an tiez hag an ostelioù prevez a zo war blasenn ar Pentevr (^{XVI}vet ha ^{XVII}vet kantved), e straed an Templ hag e straed an Itronezed (^{XVI}vet ha ^{XVIII}vet kantved), an Ostel Kerjegu (lec'h m'emañ an ti-kêr hiziv an deiz), en em gaver adarre d'ar mare ma veze produet berlînj, da lavaret eo lien graet gant lin ha kanab, a veze ezporzhiet war-zu Bro-Spagn hag an Indez dre borzhioù Sant-Maloù hag an Orient. Gant iliz Sant Matilin (^{XVI}vet ha ^{XVII}vet kantved) e weler ivez penaos e oa bet lañs da vat gant Monkontour. En deiz a hiziv eo chomet Monkontour ur gêr lusk ganti gant an touristerezh sevenadurel a ra berzh dre ar gouelioù (gouel ar Grennamzer, festival Rue dell Arte...) hag ar mirdioù (C'hoariva ar Gwiskamantoù ha Ti ar Chouanerezh hag an Dispac'h).

☰ Adalek penn-nec'h ar gêr gloz e tiskenn ar straedoù hag ar straedigoù, dousik pe a-serzh etrezek ar ramparzhioù hag al liorzhoù. Adkavout a reer liv ar Grennamzer gant displegadenoù Robin, ar barzh-kaner, ha gant anvioù ar straedoù hag al lec'hioù : plasenn ar Martred, Postern Sant Yann... En-dro d'an iliz eus ar ^{XVI}vet kantved levezonet gant ar gizioù flamank hag iltalian, ez eus tiez uhel eus ar re gaerañ : tiez o bannoù koad warno tresadennoù delioù raden pe e stumm kroaz Sant Andrev, osteloù prevez e greunvaen o zalbennoù kizellet. ☰

**Ti an Douristed
Bro Monkontour
4 plasenn ar Vengleuz
22510 Monkontour
Pgz : +33 (0)2 96 73 49 57
contact@tourisme-moncontour.com
www.tourisme-moncontour.com**

Pontekroaz



Lec'h treizh war an uhel e deun aber ar Gwaien.
Kêr-gastell doare « roc'h-kreñv ».



Ur pont war ar Gwaien, gant ur vilin-vor, hag eus al lec'h-se ez a straedoù pavezet da grapat war-zu un dosenn hag a gaver, war lein anezhi, savadurioù relijiel espar hag ur marc'hallac'h, lec'h ma oa bet ur voudenn feodel da gentañ, setu aze kêr-benn bro ar C'hab.

Deuet eo Pontekroaz diwar ur voudenn feodel ha goude-se ur c'hastell, a oa bet savet war ul lec'h dibar. En XIII^{vet} kantved e lakaas aotrouien al lec'h sevel iliz Itron-Varia Roskudon a zo un arouez eus pinvidigezh Pontekroaz. Diwar an iliz-se e vefe deuet ur « skol » dibar e Kerne a-fet tisavouriezh. Brudet e oa Pontekroaz war dachenn ar relijion hag er

XVII^{vet} kantved e voe savet kouent an Ursulinezed, lec'h ma voe staliet ar c'hloerdi bihan en XIX^{vet} kantved. Er c'hreiz-kêr kozh ez eus bet miret tiez-anez brav eus ar XV^{vet} ha XIX^{vet} kantved, Ti ar Markiz dreist-holl, a oa gwechall un ti nobl, deuet da vezañ mirdi ar Glad. Da-heul straed al Liorzhoù hag he glorietaoù, ha goude-se ar ruioù Cher Vihan ha Cher Vras, ez eer betek ar stêr, ar Gwaien hec'h anv, hag ar pont a zo stok outañ unan eus ar milinoù-mor koshañ e Breizh. Eno emañ ivez ar porzh kozh gwaskedet a zeue ar bigi donvor betek ennañ gwechall, al lec'h pouezus eta evit ar c'henwerzh er c'hornad etre ar XIV^{vet} hag an XIX^{vet} kantved. En tu all d'ar stêr emañ Keridreu, a zo unan eus karterioù koshañ Pontekroaz, hag a oa ivez ur greizenn evit a selle ouzh an armerzh gant ul labouradeg pallenerezh hag ur fritur.

≡ Adalek eil lodenn an XIX^{vet} kantved e voe dedennet neuzierien ha lennegourien gant Pontekroaz. Dont a reas un asez « oaled an arzoù » war wel en-dro da leti ar veajourien. Eno eo bet Paul de Lassence, Lionel Floch, Gaston Bouillon, Da Silva, Max Jacob, Emile Simon, Henri Matisse... ha livourien ken brudet all. Kement a awen a vez degaset bepred gant ar straedigoù a gaver an eil re a-us ar re all eus ar pont betek ar beg-douar roc'hellek. Hiziv an deiz ez eus arzourien hag artizaned arz hag a ziskouez e talc'her gant al lañs krouiñ e Pontekroaz.≡

**Ofis-kêr an Touristerezh
Straed Laeneg
29790 Pontekroaz
Pgz : +33 (0)2 98 70 40 38
otsi.pontcroix@wanadoo.fr
www.pont-croix.fr**

Pontrev



Kêr bont e deun un aber.



Savet e oa bet Pontrev er Grennamzer evel kalz kêrioù e Breizh. Dibabet e oa bet al lec'h-se abalamour ma oa e deun un aber ha ma oa eno ar pont kentañ war an Trev, ar pezh a lakaas ar gêr-se d'ober berzh. E-pad pell e ranke an hentoù da vont da Vro-Dreger ha da Vro-Quelou tremen dre aber an Trev, ha hiziv an deiz eo deuet da vezañ ul lec'h a-zoare evit bageal, ar pezh a ouie mat-tre ar Vikinged un amzer zo bet.

E penn kentañ ar XV^{vet} kantved, abalamour ma oa bet drastet kreñvlec'h Kastellin an Trev hag ar gêriadenn orin a oa uheloc'h war ar stêr eget ar gêr a vremañ, e voe savet ur gêriadenn nevez a bep tu d'an Trev, gant ur pont da liammañ an div lodenn. E-giz-se e oa ganet Pontrev. Ul lec'h a-feson e oa evit ar c'henwerzh ha dont a reas da vezañ ivez porzh Gwengamp. Adalek 1840 avat, pa voe savet pont Lezardrev, n'eo ket ret tremen dre Bontrev ken. Gant an hent-houarn en em gavas eno e fin an XIX^{vet} kantved e voe gallet diorren an obererezhioù greantel diazezet war ar c'hoad, ar c'hartoñs hag al lin. Ezporzhiet e veze an danveziou-se dre vor war-zu Europa a-bezh, ar pezh a roas lañs d'ar porzh lec'h ma veze gwelet goueletennoù eus Danmark ha Bro-Saoz e-kichen ar re a yae da besketa d'an Island. Mont a ra stumm kêr da-heul kildroennoù ar stêr. Enni e c'hall ar vizitourien gwelet div blasenn d'ar hornec hag ur regennad tiez uhel da vont eus an eil d'eben. Gant an hanter-kant poull-kannañ a ziskenn betek an Trev e weler splann al liamm a zo etre an Trev ha Pontrev.


≡ Tamolodet eo Pontrev en-dro d'an div blasenn hag en em astenn a ra betek ar porzh-bageal a yeer ac'hano war-zu Enez-Vriad, Jerzenez pe Gwernenez. Gallout a reer mont da vale er gêr-se gant he c'harrbont hag he daou bont, koulz da noz hag e-pad an deiz peogwir ez eus bet staliet eno un hentad goulaouet souezhus evit mont da zizoleiñ ar poullou-kannañ, an tiez o bannoù koad pe an tiez maen-benerezh, ur feunteun eus an XVIII^{vet} kantved, hag an ti a vez graet an "Tour Eiffel" anezhañ.≡

**Ti an Douristed
Pontrev Kumuniezh
Ti an Tour Eiffel
22260 Pontrev
Pgz : +33 (0)2 96 95 14 03
tourisme.pontrieux@wanadoo.fr
www.pontrieux.com**

Kintin



Kêr-gastell gwarezet gant an dour.



Lec'h war an uhel.
Kêr-gastell doare « roc'h-kreñv ».



Emañ Kintin etre an Arvor hag an Argoad. Er gêr-gloz kozh-se gouestlet d'ar Werc'hez Vari e kaver trizek monumant istorel rummet hag un toullad savadurioù fichet-kaer, bet savet dreist-holl e-kerzh an daou gantved ma rae berzh al labouradegoù lien lin doare « Breizh ». Ur blijadur eo mont d'ober gwelloc'h anaoudegezh gant ar gêr-se bleunvet-kaer savet e-kreiz traoñienn dudius ar Goued.

P'en em gaver e Kintin dre ar reter e vezer sabatuet o welet ar mell kastell eus an ^{XVIII}^{vet} kantved hag ar voger vras a ya ac'hane betek daou dour ar Porzh Nevez eus ar ^{XV}^{vet} kantved. Evel-se e komprenker kerkent e oa ur gêr gloz eus Kintin gwechall. Ur wech e kalon kêr e weler eil tres kêr, an tiez savet en un doare kaer en-dro d'ar blasenn greiz : tiez o bannoù koad eus ar ^{XVI}^{vet} kantved ha re all e greunvaen eus ar ^{XVII}^{vet} ha ^{XVIII}^{vet} kantved, anezho gwir osteloù prevez hag a gomprenker mat ganto pegen pinvidik e oa ar varc'hadourien lien a reas da Gintin ober berzh pa veze priziet-mat al lien fin mod « Breizh » e Bro-Spagn, ken e vezent eziporzhiat betek trevadenoù Amerika. Pa'z eer kuit eus ar blasenn greiz e tremener dre straedoù gouestlet d'ar c'henwerzh en un doare hengounel, straedigoù ha banelloù ma c'haller gwelet, e lec'hioù strizh a-walc'h, pezhioù glad dibar ha liesseurt a-leizh : savadurioù relijiel, feunteunioù, parkoù en disheol, gwelioù kaer, ha bleunioù eus ar re vrayañ da glinkañ pep tra.

☞ E Kintin, a-us reustladeg ar Goued, e kaver ar marc'had e livioù flamm ha staliou-kenwerzh lusk ganto e-barzh straedoù strizh. Pa zeuer da Gintin e-pad an nevez-amzer e tremener e-touez ar glisin, ar c'hamelia hag ar roz-malv a gresk ouzh greuvaen melen an talbennoù. E-pad an hañv ne c'haller ket chom hep mont d'evañ ur bannac'h bennak war leurenn un ostaleri war ribl ar stank, ha neuze sellet ouzh monedone ar c'hanoëoù liesliv, tra ma klevet c'hoarzhadennoù ar vugale a vez o pesketa. ☞

**Ti an Douristed
Kintin Kumuniezh
6 plasenn 1830
22800 Kintin
Pgz : +33 (0)2 96 74 01 51
accueil@tourisme-quintin-communaute.fr
www.tourisme-quintin-communaute.fr**

Ur gêr feodel en-dro dezhi saonenoù don eo Roc'h-an-Argoed. Meur a gant ti strollet war ur beg skilt a ya d'ober anezhi. Brudet-kaer eo evit he ziez-anez eus ar ^{XVI}^{vet} ha ^{XVII}^{vet} kantved hag evit ar geraniom a gaver pep lec'h enni, ar pezh a zegas un tres unvan warni, hag anavezet eo ivez evit he c'hastell hag hec'h iliz-chabistr Itron-Varia an Doz.

Adkavout a reer roudoù eus ar roc'h-kreñv adalek an ^{XIV}^{vet} kantved en ul lec'h difenn naturel ma c'halled kontrolliñ un hent tremen su-norz eus ar Mor Atlantel ha diabarzh douaroù dugelezh Breizh gwechall. Gwelet a reer ivez pegen kreñv e oa an aotrouien, a zeue ul lodenn vat eus ar vuhez armerzhel diwarno, dre ar savadurioù relijiel pe sivil. Da skouer e lakaas Klaod Reoz sevel e 1527 un talbenn er c'hiz c'hotek flammek ouzh iliz Itron-Varia an Doz, ha war a seblant ez eus bet fichet meur a di goude-se war ar patrom-se. Eus ar c'hreñvlec'h kozh e chom mogerenoù en o fezh, an douveziou hag antre ar c'hastell eus ar Grennamzer. E penn kentañ an ^{XX}^{vet} kantved e voe plijet-kaer al livour amerikan Alfred Klots gant dismantrou ar c'hastell ha gant Roc'h-an-Argoed. Adingalañ a reas neuze ar chomachoù kozh d'ober ur maner gant tammoù eus an Azginivelezh bet kemeret diwar kastell Keralioù. Gallout a reer en deiz a hiziv gwelet, e Roc'h-an-Argoed, un hollad glad savet dibar eus ar ^{XVI}^{vet} ha ^{XVII}^{vet} kantved, kaeraet gant kinkladurioù bleunioù pinvidik ha kempouez.

☞ Da bep hini, diouzh e lusk, d'ober anaoudegezh gant ar gêr-se kludet war he beg-dour. Evit ar vizitourien a blij dezho kerzhet, loc'hañ eus dor ar stank er su betek ar « vourc'h kozh » en norzh, en ur dremen dre ar banelloù war ziribin da vont d'ar wikadell gozh he mogerioù sonn hag he skalieroù serzh da ziskenn betek traoñ kêr. Evit ar re a blij dezho mont war o fouezig, loc'hañ eus Reper Sant-Mikael er reter betek ar Porzh Cadre er c'hornôg, ha neuze diwar ar vourc'h manati gozh sellet ouzh ar C'hrav brudet, ha sellet mat ivez ouzh ar « vourc'h nevez » hag he ziez cheuc'h bleunvet lec'h ma kaver staliou bihan, atalieroù, mistri artizanet, artizanet arz, pretioù ha letioù. ☞

**Roc'h-an-Argoed Touristerezh
15 straed ar C'hoc'hu
56230 Kistreberzh
Pgz : +33 (0)2 97 26 56 00
info@rochefortenterre-tourisme.com
www.rochefortenterre-tourisme.com**

Roc'h-an-Argoed

Rosko



War ur c'hourenez e bae Montroulez ez eus ur gêr ar gourserien... Ur c'hreiz-kêr istorel eus ar **XVI^{vet}** kantved, e-touez ar greunvaen hag ar bleunioù. Chomet eo merket ar mein gant an amzerioù gwechall da vare ar varc'hadourien binvidik hag ar Joniged brudet-kaer ; met ivez da vare ar varzhed, al livourien hag ar skrivagnerien a zo en em dommet kalzik anezho ouzh kêr Rosko.

E-barzh karter Roskogozh eo e krogas istor Rosko. Ne oa eno er Grennamzer nemet ur rakporzh da Gastell-Paol. Chomet ez eus c'hoazh ur c'halvar eus ar **XV^{vet}** kantved lec'h ma oa ar gêriadenn. Abalamour ma oa kontraezhet ar porzh ha da-heul meur a dagadenn gant ar Saozon e tivizas tud Rosko en em staliañ pelloc'h war-zu an norzh, lec'h m'emañ ar porzh kozh hiziv an deiz. Eno e voe graet berzh gant Rosko. Adalek ar **XVI^{vet}** kantved e krogas ar varc'hadourien, ar gabitened hag ar gourserien da bostañ ul lodenn eus o finvidigezh er mein. Hiziv an deiz e weler c'hoazh an tiez greunvaen-se hag an iliz bet savet war dachennoù douar bet gounezet diwar-goust ar mor, e-kichen ar porzh. Diwar neuze en em astennas Rosko muioc'h-mui war-zu ar reter. Mogeriet e voe beg ar Bloskom, e-kichen chapel santez Barba, en **XVIII^{vet}** kantved. En eil hanterenn an **XX^{vet}** kantved e voe savet eno ur porzh dour don ma vez dalc'het an obererezhioù a sell ouzh al listri-treizh a ra monedone en daou du eus Mor Breizh, hag ouzh ar pesketaerezh.


Lec'h war vord ur bae.
Kêr war an aod.



Er c'hreiz-kêr istorel e weler splann e teu kement tra vev zo diwar ar mor. Pep tra, eus an iliz d'an tiez cheuc'h, eus ar bigi kizellet er maen d'an touelloù pe d'ar begoù-moger er porzh kozh, a zegas da soñj eus ar pinvidigezhioù deuet diwar ar c'henwerzh dre vor. Santet e vez c'hoazh spered ar gourserien, ar floderien hag ar varc'hadourien en-dro da antreoù ar c'havioù oberiet kaer, a weler a-resed ar straedoù pe a-rez an aod. Dre ar mor ur wech ouzhpenn e krogas troioù-kaer ar Joniged a yeas en tu all da Vor Breizh evit gwerzhañ ognon Rosko. [≡]

Ti an Douristed
Rosko, Aod an Traezh, Porzhioù Iliz
Kae Auxerre - BP 58
29681 Rosko Cedex
Pgz : +33 (0)2 98 61 12 13
tourisme.roscoff@wanadoo.fr
www.roscoff-tourisme.com

Landreger



Lec'h treizh e deun un aber.
Kêr eskobel savet gant ar Vretoned.



Brudet eo kêr-benn istorel Bro-Dreger e-touez ar Vretoned en un doare dibar. Kêr ar spered hag ar vrokusted eo, hini ar preder hag ar skiant-varn ivez, hag a-hed ar c'hantvedoù e voe awenet ganti tud eus bed al Lizhiri, tud a lezenn ha tud a iliz ; eus sant Tual da sant Erwan, eus Ernest Renan da Anatol ar Braz, eus Añjela Duval da Henri Pollès hag Yvon Le Men.

« Pa vez sellet outi diwar penn nec'h he flasenn e seblant d'an den ez eo bet dozvet, an eil ti war-lerc'h egile, gant ar mell nev vaen a zo a-us dezhi. » Evel-se e komze Anatol ar Braz eus levezon bennañ an Iliz war gêr : gant Tual, anezhañ ur manac'h deuet eus Bro-Gembre, e oa bet savet abati Landreger er **VI^{vet}** kantved. War-lerc'h an ebed e voe ebed-eskibien, hag eskibien goude-se pa zeuas Bro-Dreger da vezañ, war-dro ar bloavezh mil, unan eus nav eskopti Breizh. E-touez an traoù kaer a zo deuet betek enomp war-lerc'h an eskibien emañ Iliz-veur Sant Tual (**XIV^{vet}** kantved), an eskopti kozh (**XV^{vet}** kantved) pe palez an eskob (**XVII^{vet}** kantved). Diwar an endro difer-se ez eus deuet tud hep o far evel sant Erwan, "alvokad ar re baour", hag Ernest Renan, ar prederour anavezet mat. A-hed an istor e weler Landreger evel ur vammenn eus an arzoù hag eus ar preder e Breizh, pe e vefe bet da vare penn kentañ ar moullerezh war-dro 1500, pa voe embannet ar C'hatholicon (ar geriadur kentañ e brezhoneg, latin ha galleg), pe e vefe hiziv an deiz, pa 'z eus arzoerien hag artizaned arz e-leizh.


Ar Saled, ar Chantiri, an ostelioù prevez, an tiez o bannoù koad, an ti lec'h ma oa ganet Ernest Renan, ti Saint-Pierre, kouent an Aogustinezed... Adkavet e vez istor Landreger en e bezh dre he straedoù, he straedigoù hag he liorzhoù kuzh a vez dizoloet dre an dorioù-porzh damzigor. Eus porzh ar Yeodi betek Koad ar Barzh eo ken kaer ken e teu c'hoant d'an den da chom da ruzañ. Intret eo ar mein gant koun an amzerioù gwechall, gant-se e c'haller lenn war ar mogerioù buhez ar gêr eskobel gozh ha kêr-benn Bro-Dreger. [≡]

Ti an Douristed
Bro-Dreger – Aod al Lann
Straed Marcelin Berthelot – Porzh-bageal
22220 Landreger
Pgz : +33 (0)2 96 92 22 33
contact@tregor-cotedajoncs-tourisme.com
www.tregor-cotedajoncs-tourisme.com



Villes
d'Art et
d'Histoire et
Villes Historiques
BRETAGNE

Unvaniezh Kêrioù Arz hag Istor ha Kêrioù Istorel Breizh



Un ugent kêr bennak e Breizh, o deus ur c'hreiz-kêr kozh, zo bodet en unvaniezh :

8 o deus bet al label Kêr Arz hag Istor digant Ministrerezh ar Sevenadur : Konk-Kerne, Dinan, Felger, Naoned, Kemper, Meurgêr Roazhon, Gwened ha Gwitreg.

13 zo kêrioù istorel : an Alre, Kastell-Briant, Gwengamp, Henbont, Lambal, Landerne, Lannuon, Montroulez, Pondi, Porzh-Loeiz, Kemperle, Sant-Maloù, Kastell-Paol. E-touez ar re-se emañ Montroulez ha Kastell-Paol e-barzh ur Vro Arz hag Istor.

Er C'hêrioù Arz hag Istor ez eus ur glad savouriel ha kêrel a-zoare hag un hengoun sevenadurel kreñv. Dre gendivizad en em glevont gant ar Stad evit kinnig d'an holl, a-hed ar bloaz, ur programm abadennoù ha dizoleiñ ar glad savet gant un Animatour Savouriezh ha Glad, e darempred gant Heñcherien-prezegennerien grataet.

Ar C'hêrioù Istorel n'int ket anavezet en un doare ken ofisiel, met kevredet int ouzh rouedad Kêrioù Arz hag Istor Breizh abaoe 1997, abalamour d'o

glad talvoudus, ha diwar-se ez int paeroniet gant ar rouedad-se. Gouestlañ a reont ober diouzh an erbedadennoù savet e 1984 gant ar seizh kêr diazezer, da lavaret eo saveteiñ, buhezekaet, talvoudekaet ar glad savouriel ha broudañ ar c'hrouiñ arzel e pep hini anezho.

Diwar ar c'henemglev-se e fell da Unvaniezh Kêrioù Arz hag Istor ha Kêrioù Istorel Breizh, gant skoazell vras Rannvro Breizh ha harp ar Stad hag an Departamantoù, ma vo anavezet touristerezh ar c'hêrioù grataet evel unan eus elfennoù pouezusañ ar c'hinnig touristel e Breizh ha ma vo sellet ouzh pep kêr ezel evel ouzh ul lec'h touristel dibar.

Dre forzh labourat er rouedad ha gant bolontez-vat ar c'hêrioù izili eo bet tizhet ar palioù-se tamm-ha-tamm. Evit merzout kement-se n'eus nemet mont da zizoleiñ an holl draoù a zo bet graet ingal gant ar c'hêrioù abaoe ur pemzek vloaz bennak a-benn gwellaat ha buhezekaet o zakadoù foran, evit brasañ plijadur o annezidi hag o ostizien.

Unvaniezh ar C'hêrioù Arz hag Istor
ha Kêrioù Istorel Breizh
1 straed Raoul Ponchon - CS 46938
35069 Roazhon Cedex
Pgz : +33 (0)2 99 84 00 80
citesdart@tourismebretagne.com
www.cites-art.com

an Alre



Lec'h war an uhel ha lec'h treizh e deun un aber.
Kêr-gastell doare « roc'h-kreñv ».



En Alre, ur gêr hag a oa e dalc'h duged Breizh, e kaver ur glad eus ar c'hentañ e-barzh tri lec'h disheñvel. Emañ an daou gentañ a bep tu d'un aber hag a ya e-barzh ar Mor Bihan : war ar c'hlan gliz emañ karter Sant-Goustan, anezhañ ur gêr-brioldi gozh eus ar Grennamzer, gant e santualoù war an uhel, e gaeoù birvilh warno; war ar c'hlan zehoù hag an uhelenn war valir emañ kêr an duged, anezhi gorre-kêr. Emañ an trede, an hini nevesañ, en-dro d'ar gar.

A-us da stêr ar Loc'h edo kastell an duged, a gaver meneg anezhañ adalek an ^{XI}^{vet} kantved, a veze evezhiet alese an tremenerzh war vor hag al lec'h treizh war an aber. Hiziv an deiz e chom dioutañ un tour ha pileriou-harp. Pelloc'h war-zu ar c'hornôg emañ ar gêr genwerzhel en-dro d'an ti-kêr eus an ^{XVIII}^{vet} kantved e mein gwenn ha d'ar c'hoc'huiou a oa e koad gwechall. Tro-dro d'ar blasenn-se e weler tiez bourc'hiz, tiez o bannoù koad evit ar re goshañ anezho, e greuvaen benet evit ar re nevesañ. Un tamm pelloc'h ez eus daou savadur relijiel hag a ya d'ober ul lodenn a bouez eus neuz an Alre : iliz Sant Jildaz eus ar ^{XVII}^{vet} kantved ha dreist-holl chapel ar Spered Santel eus an ^{XIII}^{vet} kantved, anezhi ur mell savadur a oa d'un urzh ospitalierien. Da-heul donedigezh an hent-houarn e fin an ^{XIX}^{vet} kantved e teuas savadurioù doare nevez tro-war-dro ar gar, e norzh kêr : war an tiez giz ar « bloavezhioù 30 » e weler induoù livet ha mozaikennoù liesliv mesk-ha-mesk. Ur gouriz glasvez a ra an-dro d'an Alre, evel hent don Kerleanoù eus tu ar su, lec'h ma voe ganet ar jeneral chouan Jord Kadoudal.


☞ E pep karter e vez kavet un aergelc'h dezhañ e-unan : an Alre a zegas c'hoant d'an den da vale war e bouezig. Diskoachet e vez teñzorioù a-leizh, lakaet war wel gant tachoù alaouret warno erminig an Alre, eus gorre-kêr betek ar Loc'h, hag adalek kaeoù Sant-Goustan. Livioù ar bannoù koad, un delwenn bennak dindan ur porched, ur wiblenn e penn un doenn, ur pont bras goloet gant liken, un atelier kuzhet... setu aze peadra da zegas plijadur d'ho taoulagad, ho fri en avel. ☞

**Ti an Douristed
Chapel ar Genveriezh
20 straed al Laezh
56400 an Alre
Pgz : +33 (0)2 97 24 09 75
infos@auray-tourisme.com
www.auray-tourisme.com**

Kastell-Briant



Lec'h treizh er pellañ ma c'haller bageal.
Kêr-gastell e Marzoù Breizh.



A-viskoazh eo bet Kastell-Briant ur gêr war ar vevenn. Kêr-benn Bro-Vez eo, "ar vro greiz" anezhi, al lec'h ma teue kontelezhioù Naoned, Roazhon hag Anjev da gejañ ha d'en em gannañ an eil gant eben, ul lec'h evel ar gedour kentañ e Marzoù Breizh. Gant foar Vere a vez dalc'het bep bloaz ouzh troad iliz Sant Yann Bere, hag a vez sachet en tu all da 45 000 a dud ganti, e weler splann eo gouestlet ar gêr-se hag he marc'hadou d'ar c'henwerzh mil bloaz zo.

Briant, a oa aet a-du gant kont Roazhon, pe a oa tost outañ, a lakaas sevel ur c'hreñvlec'h a-us d'ar C'haer e penn kentañ an ^{XI}^{vet} kantved. Goulenn a reas digant beneadiz Redon sevel ur prioldi e kornôg ar vourc'h, e anv Sant Salver Bere, anezhañ anv kentañ iliz romanek Sant Yann Bere. Ouzh troad ar c'hastell kreñv (^{XI}^{vet}-^{XIV}^{vet} kantved) e voe diazezet ar gêr a yeas war greskiñ ha lec'h ma voe savet, en ^{XIII}^{vet} kantved moarvat, ramparzhioù a adkaver o zres e-barzh stumm ar c'hreiz-kêr hiziv an deiz. Er marevezhioù modern hag a vremañ e voe diskaret moger-dro ar gêr gloz, ha lakaet e voe ahel kêr da dreiñ diouzh 90° pa voe savet straed Aristide Briand ha distrujet ar c'hoc'huiou kozh e 1865. Gwelet a reer, a-hed ar straedoù, pegen pinvidik e oa istor Kastell-Briant gwechall gant savadurioù evel Ostel La Houssaye, ti an Ael, ar Porzh Nevez, tour ar Forn Voutin, Ostel La Bothelière, tra ma c'haller kompren, pa seller pizh ouzh ar Straed Vras, penaos e oa aet ar gêr-se d'en em astenn en tu all d'ar mogerioù-tro adalek 1860.

☞ E skeud kastell kreñv ar re Vrient e zegas ar bannoù koad, an tourioù, ar c'horbelloù, an hent-ged, ar straedoù hag ar banelloù, un tres eus ar Grennamzer war galon kêr. Pa'z eer un tamm war-raok en amzer e tiskouez Kastell-Briant un neuz disheñvel gant savadurioù eus an ^{XVIII}^{vet} kantved hag an tiez bourc'hiz bet savet adalek 1860 diouzh doare Haussmann... Un tamm liv giz Pariz e Breizh ! ☞

**Ti an Douristed
22 straed Couëré - BP 193
44145 Kastell-Briant Cedex
Pgz : +33 (0)2 40 28 20 90
accueil@tourisme-chateaubriant.fr
www.tourisme-chateaubriant.fr**

Konk-Kerne



Lec'hiet war bord ur bae.
Kêr war an aod.



Emañ Konk-Kerne, gant he c'hreiz-kêr istorel ramparzhioù greunvaen en-dro dezhañ, a-hed unan eus kaerañ baeoù Breizh. Kresket eo tro-dro d'ar porzh diazezet war ijnerezh ar pesketaerezh en XIX^{vet} kantved. Pa'z eer da-heul an traoñiennoù e weler livioù Konk-Kerne o vont eus glas da glas-gwer dre ur skeuliad maezioù disheñvel. Ur gêr da zegas c'hoant da zistanañ eo.

Meneget eo Konk-Kerne abaoe an XIII^{vet} kantved. Da gentañ e voe diazezet kêr e-kreiz un ouf, war un enezennig a voe savet mogerioù-kreñv en-dro dezhi abred a-walc'h. Akempennet e voent meur a wech. Ouzhpenn ur gêr difenn e oa Konk-Kerne ul lec'h a ranked tremen drezañ evit mont eus Kemperle da Gemper. Er gêr gloz ec'h adkaver an daou du-se eus Konk-Kerne : a-dreñv ar mogerioù difenn emañ an tiez-anez koshañ. En XIX^{vet} kantved e voe krouet friturioù a-leizh ha mont a reas ar boblañs war greskiñ, da-heul kement-se e kreskas ar c'harterioù war ar ribloù tost ac'hano ; deuet eo tres kêr e-maez ar gêr gloz diwar an istor stag ouzh ar greanterezh hag ar vicherourien. Gallout a reer gwelet an doare m'eo bet kempennet ar porzh e mirdi ar Pesketaerezh. En XX^{vet} kantved e voe unanet Konk-Kerne gant div gumun nes : Beuzeg-Konk e 1945 ha Lanrieg e 1959. Da-heul al labourioù a zo bet kaset da benn nevez zo e kreiz-kêr eo bet lakaet glad ar savouriezh, hag a vez oc'h emdreñv dibaouez, war wel en e splannañ.

≡ Mont a reer tre er gêr gloz dre ur pont bihan hag a stag an enezennig ouzh an douar bras. War droad e vez graet anaoudegezh gant ar c'hreñvlec'h-se eus ar re gaerañ, dav eo krapat betek an hent-ged toullet e-barzh ar ramparzhioù tev pe mont da vale er straed Vauban etre an tiez o fignonoù, hag er straedigoù a gas war-zu ar c'hostezioù. E karter an Treizh-Lanrieg pe e kreiz-kêr ez eus troiadoù all ma c'haller gwelet birvilh ar porzh ha bed ar mor. Ar c'haeoù hag ar straedoù zo evel testenioù eus ar mare ma veze graet berzh gant ar friturioù. Diouzh an noz e vez diskouezet mat tres kêr gant gouleier staliet a-ratozh. ≡

Ti an Douristed
Kae Aiguillon - BP 529
29185 Konk-Kerne Cedex
Pgz : +33 (0)2 98 97 01 44
OTSI.concarneau@wanadoo.fr
www.tourismeconcarneau.fr

Dinan



Lec'h war an uhel ha lec'h treizh war aber ar Renk.
Kêr-gastell doare « roc'h-kreñv ».



Emañ Dinan, anezhi ur gêr eus ar Grennamzer, e deun aber ar Renk a zo digor war Aod an Emrodez etre Dinarzh ha Sant-Maloù. A-viskoazh eo bet dedennet ganti ar romantelourien hag ar veajourien sot gant an hunvreoù hag ar faltazi. « Dinan zo ur gêr brav-eston tamolodet ha mañsonet war valir a-us d'un torrod, evel un neizh gwennili », a skrive Victor Hugo, unan eus ar vizitourien vrudetañ.

En-dro d'ur c'hastell feodel, lec'h ma teu un hent bageal da groaziañ un hent war zouar, e voe savet Dinan en XIV^{vet} kantved. Adalek an XII^{vet} kantved e teuas marc'hadourien hag artizanet da labourat enni, sachet ma oant gant ar foarioù brudet. Dont a reas da vezañ kêr an dug e fin an XIII^{vet} kanved. Er mareoù-se e voe savet ramparzhioù en-dro da

Zinan – anezho ar re vrasañ a zo bet miret betek an deiz a hiziv e norzh al Liger –, hag ur mell tour-meur e fin ar XIV^{vet} kantved. Berzh a reas en un doare espar gant ar gwiaderezh betek an Dispac'h. Da neuze e lakae Dinan he finvidigezh hag hec'h identelezh war wel, ha lakaet e voe sevel an traoù arouezusañ a welomp c'hoazh : tour an Orolaj (XV^{vet}), iliz Sant Maloù (XV^{vet}-XIX^{vet}), kaeraat bazilikenn ar Salver (XVII^{vet}-XVIII^{vet}), osteloù prevez (XVII^{vet}-XVIII^{vet}). Met a-drugarez d'ar bobl vunut a labourer er boutikloù hag er staligoù e voe savet an tiez o bannoù a weler stank c'hoazh e Dinan hag a zegas he neuz dibar dezhi : tiez o c'horbelloù (XV^{vet}), tiez porched (XVI^{vet}) ha tiez o rakstaloù (XVII^{vet}). Da-heul an dispac'h greantel ez eas an obererezhioù armerzhel war zigreskiñ, anez mont da get avat. Gant he c'henwerzhourien, hec'h artizanet, he foarioù hag he marc'had eo chomet Dinan, hiziv an deiz c'hoazh, kêr-benn ar c'henwerzh e Bro ar Renk.

≡ Ur gêr digustum eo, lec'h m'en em vesk an amzer dremenet hag an amzer-da-zont er vuhez pemdez. Delc'her a ra an armerzh, lañs gantañ, hag an diduamantoù da zegas birvilh e straedoù Dinan evel da vare an duged, pa oa diazezet obererezhioù ar gêr-se war ar c'henwerzh ha war he statud kêr-benn. Pa'z eer da vale er « roc'h-kreñv » kozh-se, eus traoñ kêr betek gorre-kêr, e teu hec'h istor trubuilhet war wel bep ma tizoloer he ziez porched o bannoù koad, he mogerioù-tro sebezus pe tiez ar barantourien hag ar varc'hadourien war ar porzh. Gant abadennoù sonerezh, c'hoariva pe arvestoù er straedoù, baledadennoù dic'hortoz, e vez degaset da soñj en un doare nevesaet eus mareoù kaerañ Dinan. ≡

Ti an Douristed
Dinan – Traoñien ar Renk
9 straed ar C'hastell - BP 261
22105 Dinan Cedex
Pgz : +33 (0)2 96 876 976
infos@dinan-tourisme.com
www.dinan-tourisme.com

Felger



Lec'h treizh war an Nanton.
Kêr-gastell e Marzoù Breizh.

War ar vevenn etre Breizh, Maine ha Normandi, e-kreiz Marzoù Breizh, emañ Felger. Adalek penn kentañ hec'h istor eo bet ur greizenn a bouez evit an eskemmoù hag ar c'henwerzh. Eno ez eus chomet ur mell kreñvlec'h eus mare an dugelezh, pa oa Felger ur varoniezh vras.

Emañ kastell Felger, bet savet en ^{XIV}^{vet} kantved, en ur gildroenn eus an Nanton, hag a-viskoazh eo bet ar stêr-se ur gwarez naturel evitañ. Solutaet eo bet e zifennoù a-hed an amzer, eus an tour koad simpl a oa da gentañ betek ar pezh mell kreñvlec'h eus ar ^{XV}^{vet} kantved. E karter Sant-Sulpis, ouzh troad ar c'hastell, e teuas kivijerien, mezhererien ha livadennerien da staliañ o millinoù war ar stêr. Diouzh o zu ez a kenwerzhourien, artizaned ha bankourien d'en em staliañ war an duchenn a zo a-us an traoñienn. En ^{XIII}^{vet} kantved e lakaas Raoul III, baron Felger, sevel ramparzhioù tro-dro da gêr. Diwezhatoc'h e voe savet un ti-kêr hag ur befrez gant ar vourc'hizien, a oa deuet da vezañ mistri kêr. War-lerc'h an taniou-gwall a zegouezhas en ^{XVII}^{vet} kantved e voe adsavet Felger e maen diwar skouer doare kêraozañ Gabriel, anezhañ tisavour ar roue. E fin an ^{XIX}^{vet} kantved e c'hoarvezas ur gwir dispac'h greantel e Felger a zeuas da vezañ « kêr-benn ar boteier ». Hiziv an deiz eo bet adingalet karter ar vicherourien ha krouet ez eus bet poloù sevenadurel d'ober ul liamm etre an amzer dremenet hag an amzer-da-zont.

≡ Kaset e vezer d'ober gwelloc'h anaoudegezh gant "Kastell marvailhus Felger" da-heul un droiad leurennet. Dre arvestoù istorel adsavet, etre istor ha mojennoù, e vez diskouezet ar roll pouezus a oa gant Felger, kêr greñv anezhi, evit difenn an dugelezh. En ur zispenn roudoù tud vojennel e teu ar savouriezh gwechall da gejañ ouzh an hini a vremañ evit meskañ mein ar Grennamzer gant freskadurezh al liorzhoù war-ziribin a zo ouzh troad ar mogerioù-kreñv. Diwar ar savennoù e c'haller sellet ouzh ar c'hastell ha monumantoù Felger.≡

Ti an Douristed
2 straed ar Vroad
35300 Felger
Pgz : +33 (0)2 99 94 12 20
ot.fougeres@wanadoo.fr
www.ot-fougeres.fr

Gwengamp



Lec'h ma'z eus ur pont war an Trev war an hent kornôg-reter strategel evit norzh Breizh.
Kêr-gastell.



≡ Dont a ra identelezh Gwengamp diwar an div vro ez eo-hi stag outo : Treger hag ar vro vrezhonek evit a sell ouzh ar yezh hag ar relijion; a Pentevr evit a sell ouzh an istor hag an arme. Diwar al lec'hiadur digustum-se moarvat ar vrud a zo gant Gwengamp en deiz a hiziv, pe e vefe war dachenn ar sevenadur gant festival ar Sant-Loup, anezhañ an darvoud bras e-keñver an dañs e Breizh a vez aozet bep bloaz, pe war dachenn ar sport gant ar skipailh brudet-kaer War-raok Gwengamp.≡

Kêr-benn ar Pentevr ha perc'henniezh ar yaouaerien eus familh duged Breizh e oa bet Gwengamp gwechall. A-drugarez d'ar briñsed-se, birvidik alies, e oa deuet a-benn da zalc'her he fouez daoust da Bontrev, he forzh-mor hag a zo lec'hiet gwelloc'h war an Trev, ha kêrioù eskobel Landreger ha Sant-Brieg, eo kreñv he nerzh hag hec'h identelezh.

En ^{XIV}^{vet} kantved e voe Eozen, breur an dug Alan III, an hini kentañ o chom eno. Lakaat a reas sevel ur voudenn greñv a-us d'an Trev. Gant e vab Stefan, kont Breizh, e voe lakaet ur voger-dro ouzhpenn, lec'h ma voe diazezet ur barrez dediet d'an Itron-Varia, evit sac'hañ kenwerzhourien hag artizaned. Lakaat a rae kognañ pezhioù-moneiz eno ha sikour pemp santual ha bourc'h-prioldi d'en em staliañ e-maez ar gêr gloz, ar pezh a reas da Wengamp bezañ ur gêr a bouez bras e Breizh. E penn kentañ ar ^{XIV}^{vet} kantved, a-drugarez da Wion, breur d'an

dug Yann IV, ha d'e verc'h Janed, gwreg Charlez Bleiz, e voe lañs gant Gwengamp adarre, a-raok bezañ gwallgaset gant Brezel an Hérezh. P'en em gavas Pêr Pentevr ec'h adkrogas Gwengamp gant ur c'houlzad berzh. E-pad ar maread-se e voe treset harzoù kêr. E 1442 e voe lakaet sevel, gant an hini a yeas da zug Breizh, ur c'hastell gant pevar zour outañ. Goude-se en em astennas kêr en tu all d'ar mogerioù da-heul al lañs a oa gant labour al lien er « vourc'h nobl » tro-dro da abati Santekroe. Er ^{XVII}^{vet} kantved e voe savet an darn vrasañ eus an holladoù savouriezh a zo e Gwengamp : manatioù an Aogustinezed, an Ursulinezed, hini Montbareil, tiez nobl ha bourc'hiz o dorioù kizellet. Er memes mare avat, e 1626, e voe dispennet ar c'hastell. Distrujet e oa bet, er gêr gloz kozh, kalz tiez o bannoù koad savet gant ar skol mistri gilvizien Gwengamp, unan brudet ha dibar, pa voe adnevezet kêr Wengamp en ^{XVIII}^{vet} kantved. Daoust da se ez eo ar blasenn Greiz unan eus ar c'haerañ takadoù kêrel a gaver e Breizh, gant he glad savouriezh arouezius eus mareoù emsavañ Gwengamp.

Ti an Douristed
2 plasenn Maez ar Roue
BP 40203
22202 Gwengamp Cedex
Pgz : +33 (0)2 96 43 73 89
otguingamp@wanadoo.fr
www.ot-guingamp.org

Henbont



Lec'h treizh e deun un aber, ur beg-douar a-us dezhañ.
Kêr-gastell doare « roc'h-kreñv ».




Abaoe oadvezh an Arem eo Henbont ul lec'h treizh met kregiñ a reas hec'h istor da vat en **XII^{vet}** kantved, pa zeuas da vezañ ur gêr an dug. E bro an Oriant n'eus nemet en Henbont ma c'haller gwelet ur voger-dro eus ar Grennamzer, ha daoust d'an distrujoù e-kerzh an eil Brezel-bed ec'h adkaver eno un diverrañ eus ul lodenn vat eus istor Breizh.

Goudoret eo kêr Henbont e deun morlenn an Oriant. Savet eo hec'h anv diwar « hen » ha « pont », hag ober a ra ul liamm, dre ar Blavezh, etre an Argoad hag an Arvor. En **XIII^{vet}** kantved e voe lakaet da gêr an dug gant Yann I^{añ}. Gant e wreg Gwenn Navarra e voe diazezet eno abati sistersian Itron-Varia ar Joe. Meur a wech e voe lakaet seziz warni e-pad Brezelioù Hêrezh Breizh. Eno e voe tapet brud gant Janed Flandrez, a voe graet « ar Flammenn » anezhi goude-se, pa vroudas tud Henbont da stourm. Er **XV^{vet}** kantved e voe adsavet ar mogerioù-tro, ar pezh a weler gant Porzh Bro-Ereg hag e zaou dour a zo o tiwall antre ar gêr gloz. Er **XVI^{vet}** kantved e voe savet bazilikenn Itron-Varia ar Baradoz e doare ar goteg flammek, ha da-heul e voe krouet ur c'harter nevez. Dont a reas ar Greoù Broadel d'en em staliañ en Henbont e 1857, hag e 1860 e krogas istor bras « Govelioù Henbont ».

En Henbont e kaver un diverrañ dibar eus ar savouriezh adalek ar **XVI^{vet}** kantved betek an deiz a hiziv. A-dreñv ar mogerioù-kreñv e weler, gant an tiez tufev war o gorre, pegement a lañs a oa gant ar c'henwerzh eno gwechall. Dont a ra da soñj d'an den eus galloud an duged pa sell ouzh ti ar Senechal hag e vannaou koad. E-maez ar gêr gloz e c'haller gwelet osteloù prevez eus an **XVIII^{vet}** kantved tro-dro da blasenn Foch. Amañ pe ahont e kaver tiez bihan eus ar bloavezhioù 1930 hag o c'hinkladurioù « Arz-kinklañ ». Gwelet a reer oberoù nevez kichen-ha-kichen gant re an amzer dremenet en ur glad naturel pinvidik, ar pezh a ya da stummañ un tolead liesneuz. [≡]

Ti an Douristed
9 plasenn Foch
56700 Henbont
Pgz : +33 (0)2 97 36 24 52
tourisme.hennebont@wanadoo.fr
www.hennebont-tourisme.com

Lambal



Lec'h war an uhel war valir a-us ur gildroenn eus ar Gouesan.
Kêr-gastell doare « roc'h-kreñv »
gwarezet gant an dour.



Diazezet eo Lambal war ribl an hent kozh galha-roman Kersaout-Karaez. Kêr-benn duged ar Pentevr eo abaoe an **X^{vet}** kantved, ur pol kenwerzh hag artizanelezh, kêr ar c'hezeg abaoe an **XIX^{vet}** kantved – meur a varead he deus anavezet, ar pezh a weler gant he glad dibar a zo chomet war o lerc'h. Eno e plij an arz d'an dud a oar mat brudañ anezhañ, evel e mirdi Mathurin Méheut pe er greizenn sevenadurel Kae an Hunvreoù.

War lein an dosenn n'eus nemet iliz-chabistr an Itron-Varia, mogeriet evel ur c'hreñv, da zegas da soñj e oa Lambal ur gêr soudarded da gentañ-penn. Izeloc'h eget ar c'hastell e voe lakaet sevel tri frioldi abati gant duged ar Pentevr, kement ha diskouez splann e felle dezho lakaat o c'hêr-benn da gemer pouez er vro. En-dro d'ar prioldioù-se, gwarezet gant kildroennoù ar Gouesan, eo bet diazezet bourkoù Sant Varzhin, Sant Lazar ha Sant Jakez, diwar-se ar savadurioù kozh a gaver er c'harterioù-se daoust ma n'emeur ket e kreiz-kêr. Liesseurtered an tiez o bannoù koad a ra da stumm savouriezh Lambal bezañ dibar : adkavet e vez levezon Sant-Brieg, hini Gwengamp koulz ha hini Roazhon. Er C'hre, a oa en em staliet eno e 1825, e voe diazezet ar ouenn gezeg vreton « pounner poster » : gant ar c'hezeg-se a veze implijet stank sterniet ouzh ar c'hirri, er c'hanolieriezh dreist-holl, e oa deuet Gre Lambal da vezañ an eil e Frañs war-lerc'h ar brezel bed kentañ.

Talvezout a ra ar boan ober tro kêr war droad, hep mont re vuan. Gant hec'h oberezhioù stag ouzh an arz hag ouzh ar c'hezeg, a zo digarezioù da zalc'her gant doareoù hengounel a-feson, e vez lakaet an amzer dremenet da vont asambles gant an amzer a vremañ. War lein Run ar Salver a zo a-us da gêr ha da draonienn ar Gouesan emañ lec'h orin Lambal, lec'h ma oa kêr an aotrou ha mell kastell ar re Bentevr, e-kichen an iliz-chabistr dediet d'an Itron Varia, anezhi an divallerez speredel e-tal an diwaller bedel. Izeloc'h e c'haller gwelet ar gêr genwerzhel en he bravañ war blasenn ar Martred, gant osteloù prevez ha tiez o bannoù koad en-dro dezhi. Delc'her a reer da gerzhet etre atalieroù arzourien hag artizaned betek ar C'hre, ma c'hall ar re a blij an traoù gwirion dezho mont da vizitañ ar marchosioù, ar c'hovel, ar manej... [≡]

Ti an Douristed
Plasenn ar Foarlac'h
BP 50211
22402 Lambal Cedex
Pgz : +33 (0)2 96 31 05 38
accueil@lamballe-tourisme.com
www.lamballe-tourisme.com


Landerne



El lec'h m'emañ Leon ha Kerne sko an eil ouzh eben emañ Landerne, anezhi ur gêr hag he deus miret he glad, evel ar pont annezet kaer-eston eus ar ^{XVI}^{vet} kantved nevez-lakaet war roll ar glad istorel, hag a sav ar mor betek dindanañ. Gant ar straedigoù testenioù istorel a-leizh enno, an droiad d'anaout gwelloc'h ar glad, ribloù an Elorn, e teu c'hoant d'an den da vale war e bouezig.

Diabezet eo bet Landerne en ur c'hroashent, lec'h ma c'halled treuziñ aber an Elorn dre ur roudour ha war ur pont diwezhatoc'h, ar pezh en deus graet dezhi tapout lañs. Savet eo bet kêr el lec'h uhelañ ma vez santet levezon ar mareoù war an Elorn hag el lec'h ma c'haller treuziñ ar stêr-se en un doare aes. Adalek ar ^{XVII}^{vet} kantved e voe kempennet kaeoù da vat, diwar neuze e voe savet kêr a-hed an div c'hlan dreist-holl. Gant tiez ar varc'hadourien paramantourien savet e mein Logonna o livioù tomm, e weler e rae berzh porzh Landerne evit a selle ouzh kenwerzh al lien lin. Fardet e vezent e Bro-Leon hag ezporzhiet da Europa a-bezh, ha karget e veze ar bigi gant gwinn Bourdel evit distreiñ da Landerne. En ^{XIX}^{vet} kantved, da-heul lañs ar greanteladur ha donedigezh an hent-houarn, e krogas ur marevezh nevez evit stumm kêr : savet e voe osteloù prevez, kenkizoù ha manerioù a-leizh, peadra deomp da welet kalite ar savouriezh e Landerne d'ar c'houlz-se.

Lec'h treizh war aber an Elorn.
Kêr-gastell.




☰ Gallout a reer gwelet roudoù eus amzerioù gwechall pinvidik Landerne gant al lukanoù oberiet ouzh an tiez, gant ar greunvaen eus ar c'hentañ troc'h deuet eus Logonna. Ar valeadenn evit sellet ouzh lec'hioù ha savadurioù dibar, etre ar bannoù koad hag an talbennoù ur gwiskad mein-glas warno, a dremen dre ur pont : Pont Roc'han. Hiziv an deiz eo ar monumant espar-se, ouzhpenn 500 vloaz dezhañ, unan eus ar pontoù annezet diwezhañ en Europa. En-dro d'ar viziñ-se e vez dalc'hmat diskouezadegoù dindan an amzer. Gallout a reer ivez mont da gerzhet e-maez kêr gant ar c'hwec'h kilometrad hentoù-bale a zo war ribloù an Elorn. ☰

**Ti an Touristerezh
Bro Landerne-Daoulaz
9 plasenn ar Jeneral de Gaulle
29800 Landerne
Pgz : +33 (0)2 98 85 13 09
infos@rives-armorique.fr
www.rives-armorique.fr**

Lannuon



Lec'h treizh war an uhel e deun un aber.
Kêr-gastell.



Er gêr genwerzhel-se, a zo war an diribin war glann zehoù al Leger, ez a lusk an ijinerezh war un dro gant an identelezh gwarezet, ar pezh a weler mat gant he marc'had brudet, he ziez o c'horbellou hag an iliz espar a zo e Brelevenez a yeer betek enni dre ur skalier 140 derez dezhañ.

Savet eo bet kêr Lannuon en ul lec'h a oa bet ac'hubet en Neolitik dija, en-dro d'ur roudour ma c'halled treuziñ al Leger, lec'h m'emañ Pont Kervaria en deiz a hiziv. Diwallet e oa ar stêr-se gant ur c'hastell. Er Grennamzer e oa ramparzhioù en-dro da Lannuon. Bevañ a rae diouzh lusk ar mareoù hag obererezhioù ar porzh. Eus ar c'houlz-se ez eus chomet tiez o bannoù koad pe o gwiskadoù mein-glas gant kinkladurioù kizellet hag a weler ganto pegen pinvidik ha troet war an traoù kaer e oa tud Lannuon, osteloù prevez ha manerioù, gant melloù tourioù ouzh o zalbennoù, enno biñsoù da bignat en estajoù. Abaoe ma oa bet staliet Kreizenn vroadel ar pellgehenterezh enni e 1960 eo deuet Lannuon da vezañ ur pol ijinerezh ha skol-veur gouestlet dreist-holl d'an elektronik, d'ar stlenneg ha d'ar pellgehenterezh. Hiziv an deiz eo Lannuon un isprefeti ennañ 20 331 a annezidi, ha kêr-benn Bro-Dreger evit a sell ouzh ar velestradurezh, ar c'henwerzh, ar sport, ar sevenadur hag an touristerezh.

☰ A-us da gêr emañ iliz kaer Brelevenez, e penn he 140 pazenn. Diskenn a reer gant ar skalier-se, tiez bihan hengounel hed-ha-hed anezhañ, betek karterioù istorel Lannuon. E pleg ar straedoù, plasenoù ha banelloù e vez dizoloet teñzorioù kêr. Sablerioù koad kizellet, frammoù-koad, delwennoù-harpañ, horolaj-heol, osteloù prevez ha manerioù, tiez o gedigoù, kouentoù ha kloastroù kozh, freskenn, sternioù-aoter ha kev-iliz... peadra da welet un aridennad traoù kaer-eston a-fet savouriezh ☰

**Ti an Douristed
Bae Lannuon
2 kae Aiguillon
22300 Lannuon
Pgz : +33 (0)2 96 46 41 00
infos@ot-lannion.fr
www.ot-lannion.fr**

Montroulez



Porzh e deun un aber.
Kêr-gastell doare « roc'h-kreñv ».



Etre Leon ha Treger, e deun unan eus aberioù donañ Breizh, el lec'h ma kember ar Jarlo gant ar C'hefleud, e oa bet diazezet Montroulez war ur beg-douar a oa staliet ur c'hreñv roman warnañ dija. Lec'hiet dispar eo, ar pezh a weler splann gant ar pont bras brudet-kaer ha 62 metr dezhañ.

Moarvat e teu anv Montroulez diwar al latin Mons relaxus (Tosenn an diskuizh). War-dro ar bloavezh mil e voe lakaet sevel ur c'hastell gant atrouien Landreger. Diazezet e voe kêr dindan e warez, a-dreñv mogerioù-kreñv na chom nemet roudoù anezho hiziv an deiz e straed an Ospital kozh. E 1035 ez eas ar vourc'hadenn e dalc'h kont Leon. En diavaez d'ar gêr gloz e voe savet tri fabourz war-lerc'h an XII^{vet} kantved, en-dro da brioldi Sant Vazhe, hini Sant Melani ha hini Sant Martin. Eus ar XV^{vet} betek an XVIII^{vet} kantved e oa porzh Montroulez, a oa e-kreiz un takad ma oa kalz a bouez gant labour al lien, unan eus porzhioù pennañ Mor Breizh. Berzh a rae gant kenwerzh al lien fin a veze graet « krez » anezho. Dont a reas al Labouradeg butun d'en em staliañ war gae Leon e 1736. Savet e voe ar pont bras e 1863 evit lakaat an hent-houarn Pariz-Brest da dremen. E 1958 e voe staget bourc'h Plouyann ouzh Montroulez, hag eno e voe gallet diwar neuze sevel karterioù nevez war an uhellennoù.

Pa vezer o vale e Montroulez e c'haller, e pleg ur vanell strizh, e-mesk ar c'hlasvez hag ar stêrioù, dizoleiñ toennoù ar gêr gloz, lec'hiad ar c'hastell pe ar melloù bolzioù a ya d'ober ar pont bras. Etre ar XIV^{vet} hag ar XVII^{vet} kantved e oa bet savet an tiez pondalez, anezho arouezioù eus kêr Vontroulez, gant marc'hadourien lien. Savet int gant bannoù koad ha korbelloù a-us ar straedoù, en o c'hreiz e kaver bep taol ur pezh bras, ennañ ur mell siminal e greunvaen, ur viñs hag he zrezzennoù koad.

**Ti an Douristed
Leurgêr Sant-Melani
1 plasenn an Ostajidi
29600 Montroulez
Pgz : +33 (0)2 98 62 14 94
morlaix@tourisme.morlaix.fr
www.tourisme.morlaix.fr**

Naoned



Lec'h kemberiñ ha tremen e deun un aber.
Kêr daou vil bloaz dezhi savet er mare gal-ha-roman.



Naoned, ur gêr eus al Liger a gej an hentoù war douar, war vor ha war ar stêrioù enni, zo deuet a-hed ar c'hantvedoù da vezañ ur porzh kenwerzhel ha greantel bras, ur gêr a dremen hag a eskemmoù, ul lec'h ma kej ar sevenadurioù.

Naoned, kêr an Namned en Henamzer, zo ganet diwar an enezennoù lies-se a oa en Aber al Liger hag a lakae aes treuziñ ar stêr drezo. Er XV^{vet} kantved, tra m'en em ziskoueze Naoned evel kêr-benn Breizh, e lakaas Yann V, Frañsez II, hag an Dugez Anna da c'houde, sevel kastell duged Breizh hag an Iliz-veur Sant Pêr ha Sant Paol. Porzh kentañ eus Frañs en XVIII^{vet}, kêr en em astenn er c'hornôg, a-hed Kae ar Foz, o stummañ strolloù kêrel dibar : Enez Feydeau, ar Yalc'h, Plasenn ar Roue ha Karter Graslin. En XIX^{vet} kantved, tra ma teue Naoned da vezañ ur gêr c'hreantel, e teuas war wel savadurioù nevez, aroueziet ganto ar vodernelezh, evel Tremen Pommeraye ma kaver mesk-ha-mesk houarn ha gwer. Goude ma voe atredet brec'hioù al Liger hag an Erz e voe distrujet kêr en eil Brezel-bed. Gant al labourioù kaset da benn evit adsevel kêr, ha goude ma oa bet terket kêr da vare donedigezh an tramgarr, e oa bet adneveset kreiz kozh kêr. Hiziv an deiz ez a ar savadurioù kempred nevez savet d'ober poentoù stagañ nevez e kêr.

Al lec'hiadoù arouezel eus Naoned a ya d'ober, evel-just, merkoù a weler mat pa vez gweladennet kêr. En un doare dibar e c'haller ivez mont gant hentoù tematek. « Kontet e vo deoc'h ar baleadennoù glas e kreiz-kêr » a dremen a bark da liorz, a enezennig c'hlasvez da c'hlannoù letonek. « Kontet e vo deoc'h Jules Verne ha Naoned » a gas war roudoù Jules Verne en e gêr c'henidik, evit dizoleiñ al lec'hioù buhez-se, met ivez e lec'hioù a zegas awen, treuzet gant c'hwezh an avantur.

**Ti an Douristed
Meurgêr Naoned
7 straed Valmy
44041 Naoned Cedex 1
Pgz : +33 (0)2 92 46 40 44
office@nantes-tourisme.com
www.nantes-tourisme.com**

Pondi



Emañ Pondi e-kreiz an Argoad, war ar vevenn etre ar vro vrezhonek hag ar vro c'hallaouek, etre eskoptioù kozh Kerne, Gwened ha Sant-Brieg, etre ar Mor-Bihan hag Aodoù-an-Arvor, ha kement-se zo kaoz ez eus bet soñjet enni alies evit bezañ al lec'h gwellañ da ziazezañ ur gêr-benn nevez evit Breizh. Impalaer kentañ ar Frañsizien zoken en doa soñjet se p'en doa divadzet kêr feodet gozh ar re Roc'han d'ober "Napoléonville" anezhi ha lakaet sevel ur gêr nevez sko enni.

Krouet e vefe bet gant sant Ivi – unan eus ar benitiourien a oa bet a-leizh anezho, er Grennamzer uhelañ, o tont d'ober pinijenn e traoñienn gaer ar Blavezh. E gwirionez e oa bet savet kêr en-dro d'ur c'hastell-kreñv a oa aze evit diwall ur pont, anezhañ an treizh ret. War-lerc'h ar vourc'h-kastell-se, mogeriet en XIII^{vet} kantved, e chom ar c'hastell bet adsavet e fin ar XV^{vet} kantved gant Yann II Roc'han ha, tro-dro da blasenn ar Martred, ur c'harter kozh ennañ tiez o bannoù koad ha tiez maen kozh, gantañ ur stumm beskellek dishañvel-mik diouzh ar gêr eus mare Napoléon gant he linenoù eeun, he straedoù a-skouer an eil gant eben, he flasenoù frank hag he savadurioù sonn. Ur gêr a vent etre eo Pondi, anezhi ur greizenn kenwerzh hag ijinerezh lusk ganti en un diazad labour-douar pinvidik, hag emañ e penn un tolead ennañ tost da 60 000 annezad.

Lec'h treizh war ar Blavezh.
Kêr-gastell.



Ur gêr feodet pe kêr Napoléon ? An div war un dro ! Ha gant un orin liammet gant an arme bepred, war ribl ar Blavezh bepred hag e-tal ul lec'h treizh war ar stêr vray-se ma ranke an holl tremen drezañ, ouzh troad ar c'hastell savet da ziwall anezhañ. Er banelloù strizh ha troidellek e vezer da vare an duged, pa oa ar re Roc'han o ren eno, tra m'eo aozet kêr an Impalaer en-dro d'ur blasenn greiz frank a-walc'h da zalc'her gweladegoù soudarded warni, ha da voulouardoù eeun hag a-skouer an eil gant egile. Eus ar gêr nevez-se ez eus chomet ivez pezhioù savadurioù sonn hag ur stêr kanoliet a c'haller aozañ en-dro dezhi obererezhioù en diaveaz hag en natur.

Ti an Douristed
Pondi Kumuniezh
2 kae Niémen
Gobar Dugez Anna
56300 Pondi
Pgz : +33 (0)2 97 25 04 10
tourisme@pontivycommunaute.com
www.pontivy-communaute.fr

Porzh-Loeiz



Lec'h e genoù ur vorlenn hag e beg ur stêr.
Kêr war an aod.



Iskisat planedenn hini an havr-se a zo e beg ar Blavezh, deuet da vezañ ur porzh eus ar re bouezusañ er XVII^{vet} kantved dre c'hras roueed Frañs, hag ur gêr gouronkañ brudet en XIX^{vet} kantved dre c'hras ar rouanez Amélie !

Blavezh a oa anv kentañ ar gêr-se. Adalek ar Grennamzer e veze graet enni kenwerzh an holen, ar gwinn, ar pesked hag an edoù. E-kerzh Brezelioù ar C'hevre e krogas ar Spagnoled da sevel ar wikadell, a voe echuet e 1618 gant Loeiz XIII. Lakaat a reas hennezh mogeriañ kêr ha sevel Porzh ar Beg, ha reiñ a reas e anv d'al lec'h a zeus da vezañ Porzh-Loeiz. Gwelet a reer c'hoazh, hiziv an deiz, roudoù eus ar Spagnoled a chomas er vro e-pad ur mare (1590-1598) gant an toennoù teol-ruz, arouezius eus doare tiez ar c'hornad. Er XVII^{vet} kantved e voe staliet sez Kompagnunezh Indez ar Reter e Porzh-Loeiz, betek ar mare ma voe trec'h ar Faouedig, war c'hlann zehoù ar vorlenn, a oad krog d'ober « an Oriant » anezhi. Tiez cheuc'h ar varc'hadourien hag ar « vourc'hizien o bigi » zo testenioù splann eus ar mareoù berzh-se. Goude bezañ kollet lañs e-pad ur pennad e reas berzh adarre adalek Monarkiezh Gouere, abalamour ma oa bet sachet ar rouanez Amélie war-zu Porzh-Loeiz gant ur c'hibelldi a oa unan eus ar re gentañ e su Breizh.

Ur ober an arsav er porzh dudius-se zo evel adkregiñ gant obererezhioù a gozh troet war ar mor. War ar ramparzhioù e teu red an istor d'en em veskañ gant avel ar Mor Atlantel. Brav-espar eo ar begoù-moger, ar pontoù hag an hentoù-ged bordet gant traezh. N'eus nemet mont da vale da-heul e faltazi, pe da-heul an hentadoù kinniget, evit mont da veajiñ a-dreuz ar c'hantvedoù dre ar glad savet hag istorel. Da zeiz ar Yaou Bask, da-geñver ar festival Kemenn Barr-amzer, e vez aloubet ar gêr mogeriet kozh gant an arzoù-straed.

Ti an Douristed Bro an Oriant
Ajañs Porzh-Loeiz
1 straed ar Wikadell
56290 Porzh-Loeiz
Pgz : +33 (0)2 97 847 800
portlouis@lorient-tourisme.fr
www.lorient-tourisme.fr

Kemper



Lec'h kemberiñ ha treizh e deun un aber.
Kêr daou vil bloaz dezhi savet er mare gal-ha-roman.



Anavezet-mat eo Kemper, anezhi kêr an eskob ha kêr an dug, evel kêr-benn istorel Bro-Gerne. Ha pa vefe tres ar Grennamzer warni, gant hec'h iliz-veur dreist pep tra, ez eo ur gêr eus an **XIX^{vet}** hag an **XX^{vet}** kantved.

A-hed an istor eo bet Kemper ur goudor hag ul lec'h treizh. Savet e oa bet ar gêr gentañ e deun un aber da vare ar Romaned, en-dro da obererezhioù ar porzh a oa izelloc'h, e Lokmaria. Er Grennamzer e voe tapet lañs el lec'h ma kember ar Stêr Deir gant an Oded (diwar-se anv Kemper), abalamour ma oa ul lec'h aësoc'h da zifenn moarvat. Ne c'haller ket komz eus Kemper, kêr-benn gozh konted c'halloudus Kerne ha kêr an eskob, anez ober anv eus sant Kaourintin a oa mignon d'ar roue mojennel Grallon. Hiziv an deiz ez eus ramparzhioù en-dro d'ar c'hreiz-kêr. Adalek iliz-veur c'hotek Sant Kaourintin (**XIII^{vet}**, **XV^{vet}** ha **XIX^{vet}** kantved), unan gaer ma'z eus, e loc'h ur rouedad straedoù ha straedigoù, tiez o bannoù koad hag re vein eus ar **XVI^{vet}**, **XVII^{vet}** ha **XVIII^{vet}** kantved a bep tu dezho. A-hed an Oded emañ kêr an **XIX^{vet}** kantved, gant he forzh hag he savadurioù melestradurel. Merzout a reer ar c'haeoù espar kempennet brav gant o zreuzelloù bleuñvet.

≡ Pa'z eer uheloc'h a-hed ar glannoù dudius eus lodenn vor an Oded e weler mat al lec'hioù pouezus stag ouzh istor Kemper : Lokmaria, ouzh troad Menez Fruji, ul lec'h mojennel war zinaou ma kaver ar gêriadenn gal-ha-roman a orin a zeuas da vezañ ur fabourz gant ur prioldi beneadat war-lerc'h ar bloavezh mil, hag ur c'harter pobl goude-se pa voe staliet feilhañserezhioù eno e 1690 ; uheloc'h c'hoazh, war ar c'hlann all, emañ an eil kêriadenn savet goude ar bloavezh mil, hag a ya daou stroll kêrel d'ober anezhi : plasenn Douar an Dug, gant he lez-varn, he ziez o bannoù koad hag he c'houentoù eus ar **XVII^{vet}** kantved, ha kêr an eskob hag he neuz eus ar Grennamzer, mogerioù-kreñv en-dro dezhi, etre ar Stêr Deir hag ar Froud.≡

**Ti an Douristed
Kemper e Kerne
Plasenn ar Rezistañs
29000 Kemper
Pgz : +33 (0)2 98 53 04 05
office.tourisme.quimper@wanadoo.fr
www.quimper-tourisme.com**

Kemperle



**Lec'h kemberiñ ha treizh e deun un aber,
ur beg-douar a-us dezhañ.**
Kreizenn relijiel krouet gant ar Vretoned
ha gwarezet gant an dour.



Evit an holl re o deus bet digarez da chom ur maread e Kemperle, eus Brizeug da Flaubert, ez eo ul lec'h m'eo kuñv ar vuhez. War harzoù Bro-Gerne emañ hag ul lec'h pouezus eo evit a sell ouzh sevenadur Breizh peogwir e oa bet ganet eno Matilin an Dall, an talabarder brudetañ a zo bet biskoazh, Dom Moris, istorour anezhañ ha tad al lennegezh vreizhat, ha Teodor Hersart a Gervarker, barzh bet skrivet "Barzhaz Breizh" gantañ, anezhañ an oberenn he doa lakaet perzhioù dibar ha fromus al lennegezh dre gomz eus Breizh war wel.

Traoù kêr eo kêr an teir stêr. Ober a ra an div gentañ, an Ele hag an Izol, an dro d'un enezenn vihan, lec'h ma voe diazezet ar gêriadenn orin en **XI^{vet}** kantved gant beneadiz Redon a savas eno abati ar Groaz Santel. El lec'h-se e kaver an testenioù eus an istor relijiel ha laik, an osteloù cheuc'h eus karter an noblañsed (eus ar **XVI^{vet}** d'an **XIX^{vet}** kantved), hag an tiez o bannoù koad, ar pont bleuñvet eus ar Grennamzer, liorzhoù an Ele, ar goredoù... A-hed an trede stêr, al Laeta, deuet diwar gember an div all, e weler mat, gant an tiez-anez mein kaer war ar c'haeoù, e veze graet berzh gwechall gant ar porzh. Buan a-walc'h, peogwir e oa re strizh ar glannoù, en em astennas Kemperle war an tosennoù tro-war-dro, diwar-se e teuas gorre-kêr war wel, war he lein iliz Maria-Hanter-Eost (**XIII^{vet}** ha **XV^{vet}** kantved), anezhi "Menez-Mikael-an-Douar". Eno emañ ivez chapel ha kouent an Ursulinezed (**XVI^{vet}** kantved), chapel Sant Eutrop a zo sko en ospital eus ar Grennamzer (**XVI^{vet}** kantved). Diwar ar beg-douar-se e c'haller ivez sellet ouzh lec'hioù kaer evel ar stêrioù hag ar c'hoad pelloc'h war an dremmwel.

≡ Eus ar pont bleuñvet betek chapel an Ursulinezed ez eer da zizoleiñ istor Kemperle dre pontoù, straedoù doare ar Grennamzer ha skalieroù pavezet. Adalek ar c'haeoù a-hed he stêr-vor eo aet Kemperle d'en em astenn dousik war-zu an uhelennoù. E-kichen ar monumantoù relijiel ez eus deuet savadurioù stag ouzh ar porzh hag ar c'henwerzh. Diskoachet e vez a bep eil milinoù, stalioù-kivijerezh kozh, liorzhoù... Gallout a reer zoken mont da bourmen da-heul red an dour, e bourzh ur c'hanoe-kaiak.≡

**Ti an Douristed
3 plasenn Charles de Gaulle
29300 Kemperle
Pgz : +33 (0)2 98 96 04 32
contact@quimperletourisme.com
www.quimperle-tourisme.com**

Roazhon



Lec'h tremen war harzoù ur stêr verdeüs.
Ur gêr daou vil bloaz gal-ha-roman an orin anezhi.



Roazhon, "Breizh er gêr-benn", zo war-hed div eurvezh diouzh Pariz gant an TTB, a ginnig pinvidigezh hec'h istor a bad abaoe 2 000 bloaz dre he glad adsavet, merket gant Breujoù Breizh, hag a rann birvidigezh he 60 000 a studierien.

Ma'z eo bet test Porzhioù Morzhell eus kurunidi-gezh Duged Breizh e kont ar straedoù strizh ha kammigellek, tiez o bannoù koad a bep tu dezho, war an ton bras ar chemet emdroüs eus ar ^{XV}^{vet} d'ar ^{XVII}^{vet} kantved. War-lerc'h tachennaoueg ar Grennamzer e teu ar gêr glasel hag he div blasenn roueel hag a zo kichen-ha-kichen, merket pep hini anezho gant ur savadur hollbouezus : Breujoù Breizh – a gaver roudoù dibar warnañ eus Istor Breizh hag eus Istor an arz gall eus ar ^{XVII}^{vet} kantved – hag an Ti-kêr (^{XIX}^{vet} kantved) bet treset gant Gabriel, savour plasennoù ar Roue. En tu all d'an osteloù prevez, savet gant koad ha maen, ha da balezioù an abaded, Liorzh an Tabor, treset gant ar re vBülher, gweledvaourien veur eus an ^{XIX}^{vet} kantved, a ziskouez eus ul lec'h a beoc'h anezhi e-kreiz kêr. Ar poull-neuial Sant-Jord, giz an Arz-kinklañ, zo unan eus an testenioù a ro da c'houzout ez eus kalz a vozaik e kêr. Tremenet ar Gwilen ha mirdi an Arzoù-kaer, ar c'hendi Poirier en diskouez. Gant Christian Porzhampark e vo savet ar Maezioù Frank e 2006. Eno eo bodet Mirdi Breizh, Egorenn ar Skiantoù, ar planetarium hag al levraoueg.

Roazhon zo birvilh enni a-hed ar bloaz diwar lusk he festivalioù. Brudet en estrenvro gant an Transmusicales, he c'hrouidigezh arzel a vez lakaet da dalvezout ivez gant program-madurioù an Opera, C'hoariva Broadel Breizh, Laz-seniñ Breizh... e marc'had al Lisoù, an eil eus Frañs, e vez leurennet ouzhpenn 300 produer lec'hel ha rannvroel bep Sadorn vintin, en un endro dibar (osteloù prevez ha koc'hu metalek). Ur mare plijus a zo arabat c'hwitañ.

Ti an Touristerezh hag ar C'hendalc'hioù Meurgêr Roazhon
11 straed Sant-Erwan
CS 26410
35064 Roazhon Cedex
Pgz : +33 (0)2 99 67 11 11
infos@tourisme-rennes.com
www.tourisme-rennes.com

Sant-Maloù



Lec'h e genoù un aber.
Kreizenn relijiel bet savet gant ar Vretoned ha kêr war an aod.



Marteze eo eus Dinarzh e c'haller gwelet "Sant-Maloù an Enez", evel ma veze graet anezhi gwechall, en he c'haerañ gant he osteloù o siminalioù uhel, o zoennoù war zinaou, o zalbennoù greunvaen, savet en un doare diginkl ha sonn.

War ur c'hreñv naturel, anezhañ ur c'hourenez roc'hellek a c'haller diwarni kontrolliñ aber ar Renk, emañ Sant-Maloù. Un dro-spered frank zo bet a-viskoazh gant tud Sant-Maloù, gant-se e teuas a-benn kêr da gaout frankizoù ha dreistgwirioù a-hed ar c'hantvedoù. Talvoud a ra alies anv Sant-Maloù kement ha hardizhegezh da-heul troioù-kaer Duguay-Trouin ha Surcouf, pa oa porzh ar gourserien hag ar c'henwerzh gant ar broioù pell. Er ^{XVII}^{vet} kantved en em gavas pinvidik-mor, ken e c'halle ar baramantourien ac'hano prestañ arc'hant d'ar roue Loeiz XIV, tra ma vezent o lakaat sevel manerioù e maezioù ar geinvro. Savet e voe ar mogerioù-tro ha porzh Sant-Visant en ^{XVIII}^{vet} kantved, hag ivez an osteloù kaer a voe adsavet goude an eil brezel bed evel ma oant a-raok. En ^{XIX}^{vet} kantved e krogas an touristerezh kouronkel a-hed an Aod Vras, lec'h ma voe savet ur c'hazino, ul leti bras ha tiez cheuc'h a-leizh : balioù ledan, graet a-ratozh evit ar c'hirri-tan, a gemeras neuze plas an hentoù traezh ma tremene merc'hed al laezh eus Parame.

Sant-Maloù e klevet trouz ar mor eus pell, gant heklek ar c'horventennoù hag ar mareoù bras, pe divinet e vez e disheol sioulaet ar straedoù bihan. Eno emañ ar mor e pep lec'h, gant istor tud Sant-Maloù, en o doareoù liammet ouzh ar mor, en dud dibar a zo, pe a zo bet o vevañ enni, paramantourien, merdeerien, dizoloerien, kourserien, pesketaerien an Douar-Nevez pe skiperien, hag evel-just gant dudioù plijus an hañv hag ar pemdez, kouronkañ, c'hoarioù ha sportoù war an traezhenoù, sportoù riklañ ha bageal.

Ti an Douristed Reper Sant-Visant
35400 Sant-Maloù
Pgz : +33 (0) 825 135 200
info@saint-malo-tourisme.com
www.saint-malo-tourisme.com

Kastell-Paol



Lec'h war vord ur bae.
Kreizenn relijiel bet savet gant ar Vretoned.



Ur gêr sioul eo Kastell-Paol, a zo bodet en-dro da savadurioù relijiel divent koulz lavaret ha kelc'hiet, dre chañs, gant ur « gouriz alaouret ». Krog eo pouez istorel ar relijion eno da zigreskiñ tamm-ha-tamm...

Dre ar milendall straedigoù a ya kuit eus plasenn al leurenn-liz, pa droer kein ouzh ar vazilikenn iliz-veur saouzanus eus an ^{XIII}^{vet} hag ^{XVI}^{vet} kantved, ez eer d'ober anaoudegezh gant kalon disakr Kastell-Paol gozh. E-lec'h an tiez o bannoù koad ez eus bremañ tiez maen-ben sonn o zres eeun ha sonn : e korn straed Rozière e weler un ti outañ un dourell ginklañ, ar pezh a ra d'an den kompren pegen pinvidik e oa Kastell-Paol. Meur a souezhadenn hag a varzhoniezh a gaver gant ar straedoù ivez : ar « rue aux Eaux », gwechall « rue des Os » (ru an Eskern) abalamour ma oa eno tachenn ar gigerien, ru al Lin, ganti ar roud diwezhañ eus hengoun ar gwiaderzh, ru Lenn ar Gloar gant he feunteun vuzhudus bet benniget gant sant Paol Aorelian ha n'eo ket aet da hesk gwech ebet abaoe ar ^{VI}^{vet} kantved... El lec'h m'en em groaz hentoù pennañ Kastell-Paol emañ chapel ar C'hreiz-kêr a sav he zour uhel en oabl, betek 80 metr, ur gwir zichekadenn e-keñver an dud, an amzer hag an elfennoù.

Pa'z eo war un dro kêr gozh eskibien Leon ha kêr-benn oberiant ar gounit legumaj hag al liorzhouriezh, ez eo Kastell-Paol, a-dra-sur, al lec'h ma weler ar splannañ daou berzh pouezus eus Breizh : an hengoun tomm ouzh ar relijion hag al labour-douar nevezus. Diouzh un tu emañ ar glad d'ibar hag arouezus stag ouzh an eskibien – an iliz-veur, palez an eskob, chapel ar C'hreiz-kêr, tiez ar chalonied, kloerdiou ha kouentoù – ha diouzh an tu all, e-mæz ar gêr gozh, emañ puilhentez ha liesseurded an takad produiñ legumaj pennañ en Europa (artichaod, kaol-fleur hag un ugent gouenn legumaj bennak all) hag ar greizenn liorzhouriezh kentañ e Frañs (kamelia, roz, brug-ros...).

Ti an Douristed
Plasenn an Eskopti
29250 Kastell-Paol
Pgz : +33 (0)2 98 69 05 69
tourisme.st.pol.de.leon@wanadoo.fr
www.saintpoldeleon.fr

Gwened



Lec'h e deun ur pleg-mor.
Kêr daou vil bloaz dezhi savet er mare gal-ha-roman ha sez unan eus kentañ eskoptioù Breizh.



Emañ Gwened e deun ar Mor Bihan. A-hed ar c'hantvedoù he deus dalc'het gant he hengounioù hag hec'h obererezhioù. Gant ur glad pinvidik deuet eus ar mare ma oa Gwened kêr an duged, he forzh-bageal hag ar Mor Bihan e-kichen, ez eo Gwened unan eus kreizennoù pennañ arvor Breizh a-fet touristerezh. Kaset e vezer da veajiñ en amzer dre he glad.

Dre glad Gwened e c'haller ober anaoudegezh gant ouzhpenn 200 vloaz istor. Er ^I^{añ} kantved ar-raok Jezuz Krist e voe savet ur gêr nevez, Darioitum hec'h anv, gant ar Romaned e bro ar Weneted. En ^{III}^{vet} kantved e voe savet ur c'hreñv a voe diazezet diwarnañ ar gêr mogeriet a rae dek hektar e fin ar Grennamzer. Unan eus al lec'hioù a

blije ar muiañ da duged Breizh bezañ o chom enno e oa Gwened, ha liv ar Grennamzer zo chomet warni en-dro d'an iliz-veur : tiez o bannoù koad a gaver a-hed straedoù strizh, ar C'hovu a zegas da soñj d'an den eus ar marc'hadoù hag al lec'hioù barn er Grennamzer. Gant an osteloù prevez a gaver er su d'ar gêr gozh e c'haller gwelet penaos e teuas ur gêr graet e koad d'unan graet e mein er ^{XVII}^{vet} kantved, evel lakaomp er straed Sant-Visant, a-hed anezhi osteloù prevez a oa graet evit izili Breujoù Breizh a oa bet staliet e Gwened eus 1675 betek 1690. Dont a reas ar porzh da vezañ kalon armerzh kêr, hag eno e lakaas marc'hadourien ha paramantourien sevel o ziez-anez. Gant daou savadur ton ganto, an Ti-kêr hag ar Prefeti, e c'haller gwelet e oa kresket kêr en tu all d'ar mogerioù-tro en ^{XIX}^{vet} kantved, d'ur mare ma oa bet tapet lañs adarre gant kêr Wened.

Pa'z eer da-heul pourmenadenn ar Waremm, a-hed ar ramparzhioù eus tu ar reter, e c'haller kaout ur gwel kaer war al liorzhoù hag ar poullou-kannañ kozh, ar mogerioù, an tourioù hag an toennoù a zo er gêr gloz. En tu all d'ar mogerioù-tro eo-hi stummet evel un añfiteatr betek an iliz-veur, gant savadurioù o bannoù koad kizellet eus ar Grennamzer ha savadurioù maen-ben klasel a bep eil. Ouzh talbenn un ti e kaver delwenn « Gwened hag e vaouez » a vez o saludiñ ar vizitourien. Izeloc'h, pelloc'h eget porzh Sant-Visant, emañ reper ar porzh bet kempennet evel zo dleet ha digor war ar Mor Bihan. Mont a ra an hollad kêrel kempennet pizh-se d'ober ul lec'h a-zoare evit aozañ festivalioù ha gouelioù istorel Gwened.

Ti an Douristed
Gwened hag ar Mor Bihan
Kae Tabarly - CP 23921
56039 Gwened Cedex
Pgz : +33 (0) 825 13 56 10
info@tourisme-vannes.com
www.tourisme-vannes.com

Gwitreg



Lec'h torgennek.

Kêr, aozet tro-dro d'he c'hastell, doare « roc'h-kreñv » war Marzoù Breizh.





« Gwelet ur gêr c'hotek klok, en he fezh, unvan, evel ma chom un nebeud anezho c'hoazh : Nürnberg e Baviara, Gasteiz e Spagn pe Nordhausen e Prusia ». Victor Hugo diwar-benn Gwitreg, Notre-Dame de Paris, 1831.

E Gwitreg e voe savet ur c'hreñvlec'h adalek an ^{XIV}^{vet} kantved evit kontrollañ an tremen war ar Gwilen ha savet e oa bet ur voger-dro tro-dro kêr etre 1220 ha 1240. Berzh a reas adalek ar ^{XV}^{vet} kantved gant kenwerzh etrebroadel ar c'hanab hag ar c'hanavaz. Tiez, pezhioù savadurioù anezho, a oa bet savet neuze, e Straed an Traoù da skouer, gant Marc'hadourien Tramor. Ar re-se, bet strollet en ur Genvreuriezh abaoe 1472, a lakaas sevel iliz an Itron-Varia er c'hiz c'hotek flammek. Ur gêr hugunot eo abaoe m'en em droas hec'h aotrounez warzu ar brotestantiezh. Gwitreg a antreas en ur mare enkiñ goude torridigezh Edit Naoned e 1685. Kêr, deuet da vezañ isprefeti, a voe birvilh en-dro enni gant donedigezh an hent-houarn e 1857, ha goude ma oa en em staliet ar ⁷⁰^{vet} rejimant troadegiezh e 1874, ha goude e 1883 gant digoradur iliz Sant-Varzhin, nevezromanek he giz. Goude 1918, abalamour da ziskar an obererezhioù hengounel, ar c'hi-vijerezh hag ar gwiaderezh, e voe ur mare enkiñ nevez. E deroù ar bloavezhioù 1970 he doa adkavet Gwitreg al lusk a oa ganti evit dont da vezañ hiziv an deiz unan eus ar polioù diorren ekonomikel pouezusañ e Breizh.

Ar gêr bont war ar Gwilen zo e berr gormzoù al lodenn zibarañ anezhi war he glann gleiz, gant he beg roc'hellek zo bet warni he c'hreñvlec'h tric'hornek brav-eston hag an annezioù pinvidik en he Gorre-kêr. Ha koulskoude ez eo kenkoulz ivez he glann zehou, zo bet savet war he zarzioù fabourz ar Rachapt, tiez o bannoù koad ennañ, a oa bet gwarezet a-drugarez d'he stammerezed e deroù an ^{XX}^{vet} kantved, ha kinnig a ra, evel er Runioù Du, plegoù bras ha dibar war ar beg a voe stummet gant an arz milourel er Grennamzer.

Ti an Douristed Bro Gwitreg
Plasenn ar Jeneral de Gaulle
35500 Gwitreg
Pgz : +33 (0)2 99 75 04 46
info@ot-vitre.fr
www.ot-vitre.fr





Kêrioù Arz

Glad Kêrioù Breizh

1 straed Raoul Ponchon - CS 46938
35069 Roazhon Cedex
Pgz : +33 (0)2 99 84 00 80
Plr : +33 (0)2 99 28 44 40
citesdart@tourismebretagne.com
www.cites-art.com

Embannet gant :

Kevredigezh Kêrioù Bihan Neuziet-kaer
Breizh hag Unaniezh Kêrioù Arz hag Istor ha
Kêrioù Istorel Breizh – Genver 2012.

Kenurzhiañ an embann :

Florence Le Thérisien

Testennoù :

Kêrioù Bihan Neuziet-kaer ; Kêrioù Arz hag Istor ;
Kêrioù Istorel ; Jean-Bernard Vighetti ; Annick André.

Luc'hskeudennoù :

W. Berré, E. Berthier, Y. Boëlle, C. Crié, Diaphane,
J. Ganievecchiolino, J.-P. Gratién, C. Guillaume, J.-Y. Guillaume,
F. Hamon, F. Le Divenah, M. Schulte-Kellinghaus.
Mignonéd ar Wiaderien - Kintin, Kanoë Kaiak - Ar Roc'h-
Derrien, PRTB, D. Gouray - Kêr Roazhon, M. Langle - OT Pondi
Kumuniezh, ORPLRB, Servij Talvoudekaat ar Glad - Henbont,
Kêr Wengamp, A. Vittet - OT Lanyugon.

Troet gant :

Ofis Publik ar Brezhoneg

Empentet ha savet gant :

Landeau Création Graphique

Kartenn Breizh :

Le Jardin Graphique

Moulllet gant :

Les Presses de Bretagne

Moulllet e Frañs

